

dauet ar brad du

IV° 73 - 1376

deizleu

1974~1975



Gant

Youenn TROAL

IMBOURC'H

I M B O U R C ' H , K E L A O U E N N B O L I T I K E L

Seizhvet bloavezh

N i v e r e n n 73


31 Genver 1976

Kemenn.....p.3  
Raklavar.....p.5  
Kartennoù.....p.11  
"Davet ar Prad Du", gant Youenn Troal...p.15

=====  
Koumanant-bloaz : 35 lur. KRP : Y. Ollivier,  
1 534 25 Roazhon. Derouiñ a ra ar c'houmanant  
e miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 10 lur.

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier,  
7 bd. A.-Burloud, 35 000 Roazhon.  
CPPP : 50 015



YOUENN TROAL, beleg,  
en deus aozet an deizlevr-mañ



YOUNG TROAL, veleg.  
an douz horez an deizlevr 1976

K E M E N N

GANT DEIZLEVR YOUENN TROAL ER  
PEROU E KROG BLOAVEZHIAD 1976  
IMBOURC 'H.

EVEL BOAZ E KENDALC 'HIMP DA  
GAS TEIR NIVERENN GENTAÑ AR  
BLOAVEZHIAD-MAÑ D'AR GOUMA-  
NANTERION. GOULENN A REOMP  
DIGANTO EVELKENT KAS AN ABR-  
ETAÑ AR GWELLAÑ GWERZH O  
C'HOUMANANT EVIT 1976.

EVEL M'HON EUS MERKET ENDEV,  
PLIJET E VEFEMP IVEZ O TEGEMER  
SKRIDOU HA PENNADOU PE EVEZH-  
IADENNOU A BEP SEURT.  
TRUGAREKAAT A REOMP HOL LENN-  
ERION EN A-RAOK.

=====+

RAKLAVAR

Laouen omp o kinnig d'hol lennerion skrid an deizlevr dalc'het gant hor c'heneil Youenn Troal abaoe maz eo aet da bleidiñ gant Indianed Kristen Perou e miz Gwengolo 1974, e kreisteiz ar Riez-hont. Bet e oa dija o vevañ eno un dek vloaz bennak a zo, hag eñ o seveniñ e gefridi a veleg e-touez an hevelep Indianed, bepred a-berzh ar "Fidei donum", o poaniañ da virout ar Feiz e-touez ar bobl-hont.

N'eo ket din marteze reiñ meuleudi d'an oberenn-mañ peogwir ez on an embanner anezhi. Karout a rafen lavarout, evelkent, em eus kavet dudi bras o lenn pajennadoù an deizlevr-mañ ha da gentañ en abeg d'ar yezh ; soñjal a ra din ez eo Youenn Troal un-an eus hor gwellañ skrivagnerion, brezhoneger a vihan-ik desket brezhoneg gantañ war varlenn e vamm, e rannvro vrudet ar Bigouden, evitañ da vevañ abaoe pell e Leon. Boemet on bet - ha bez' e vo al lenner eveldeon, moarvat, - gant tro-bluenn akuit ha mibin ar skrivagner, bevder ur yezh pinvidikaet ha bubezekaet gant teñzor hon teodyezhoù ha peurgent hini kreisteiz Kernev ; seul vrasoc'h dudi am eus kavet er yezh-se maz on-me ivez genidik eus Kernev, petra bennak ma n'eo ket heñvel mik, eveljust, eilyezh Waien ouzh hini Gombrid.

En danvez ivez, avat, em eus kavet deur. Ec'hon eo an danvez-mañ ha ne fell din merat nemet daou pe dri c'hraf a hañval din bezañ dedennus. Unan anezho a zo hini an darempred a zo etre ur gevredigezh plouezat kentidik dizesk hag ar relijion. Lakaat a ra stuzegezh an Indianed er Perou - diouzh ma c'hellan he merzout, a-dreuz deizlevr Youenn Troal, - da soñjal en hini ar Vrezhoned er c'hantved tremenet, pa oa

amparet pobl Vreizh gant 95% a gouerion o vevañ war ar maez. Moarvat, sevenadur gounezal ar prantad-se a leze an den dic'halloud dirak an natur hag a gadarnae ennañ en ur stumm bennak ur relijielezh a gawe he gwalc'h er gravez kristen end-eeun. Pa studiomp avat istor hor c'hevredigezh kornogat a-c'houde deroù an oadvezh greantel e stadomp penaos ez eo aet ar gravez war goazhañ a-feur m'en em lede ar sevenadur greantel arnevez a zilam kuit pepdarempred dihanterat etre an den hag an natur hag a laka anezhañ a-stok hep en ouzh eilnatur ar gevredigezh deuet da vezañ un doue enkorfet diouzh ma pourchas d'he sujidi kement o deus ezhomm (ha c'hoazh, ouzhpenn, ez eo gouest da vroudañ enno an ezhommoù hepken ez eo barrek pe vennet da walc'hañ, da lavarout eo, opioù a bep seurt). Neuze 'ta, ar goulenn a sav a zo hemañ : daoust ha diorren ar sevenadur greantel ne dalvez ket kement ha distrujañ ar relijion ? Ken mat eo bet komprenet ar gudenn gant 'emired' zo eus pleg-mor Persia, Muzulmiz anezho, perc'henned tireoul, m'o dije nac'het ar re-mañ - war am eus lennet - degas d'o sujidi madoberoù ar sevenadur arnevez greantel (1). D'ar mare-se, daoust hag ar gristenion a harp diorreadur ur gevredigezh kevalaour pe sokialour marksour hep bezañ perzhiet da vat er galloud politikel ne reont ken nemet reiñ un taol-skoaz da ziskar ar gravez a garfent saveteiñ, a-hervez ?

Hogen, petra a dalvez ivez ar ger 'kravez' ? Ma ne c'hoarvez houmañ, a-benn ar fin, nemet eus un dastumad pe, kentoc'h, ur meskaj a gredennoù hanter pagan hag hanter gristen, daoust ha talvezout a ra ar boan he mirout ? Daoust ha talvezout a ra ar boan ivez mirout ur vuhezegezh sonnet ha n'eo ken awenet gant ur meizadur don eus an den hag e zarempred gant Doue, e nesañ hag ar bed, pa n'eus diazez all ebet dezhi estreget

(1) Ne ran nemet stigmañ ar gudenn, eveljust, rak n'on ket a-du tamm ebet gant unpennoù ha bourc'hizion henvoazel a fell dezho derc'hel ar poblañsoù en diouiziegezh, en anistor hag en isdiorreadur evit gellout o c'horvoñ aesoc'h a se, ober anezho o sklaved.

hudc'hizioù ha rekipeoù (1) ? Anat eo koulskoude n'eus abeg mat ebet da virout, evito o unan, evel traezoù hud end-eeun, un dastumad kredennoù e-touez ur rumm tud zo war zigarez ez int poblel pe vroadel. Evidon-me atav, ne gavan ket souezhus na feukus e trofe ar pobloù isdiorreet war-du ar varksouriezh ur wech maz int krog gant argerzh o diorreadur armerzhel : ar varksourion, da vihanañ, a ginnig ur ster d'o strivoù ; ar gristenion, diouzh ma klaskont hepken'mirout' ar relijion evel un afer hiniennel ha personel da bep unan pe un dastumad kredennoù hep dastaol ebet war ar gevredigezh, a ra ivez eus ar gravez ur gwengel pe, gwashoc'h, ur vojenn a lez ar bobl en anistor.

An eil kraf a fell din imbourc'hañ bremañ ez eo dres hini kevredadelezh ar relijion. Aliesik e klever kristenion 'frankizour' pe 'araogelour' o tamall ar relijion a wechall, ur relijion gevredadel (1) ; sammet war an dud, heuliet war-bouez ur bulzunerezh (3) diene hag a enebont ouzh un nevez-relijion a vefe frouezh un dibab pe ur gejadenn bersonel gant Doue h.a. Un damveneg eus an dazeilad-mañ a gavan en un arroudenn eus deizlevr Youenn Troal pa ra dave d'ar gristenion a zilez an Iliz en ur ober implij eus o frankiz. Moarvat, diouzh ma ne vefe ar pleustrerezh relijiel, e-touez ar werin peurgent, nemet eztaol krin ha mekanikel ur stuzegezh sonnet e c'heller kompren e kavfe gwell kristenion sklerijennet zo gwelout seurt fideled o tilezel un emzoug diavaezel ha diwirion. Hevelep breutadenn, avat, a zo didalvez a-walc'h. Anavezet em eus ar gevredigezh plouezet a gentaou ha gellout a ran lavarout e vuheze ar gristenion henvoazel o feiz, don pe zonoc'h, moarvat, hervez o zemz-spered pe o ferzhioù ene, nemet ne oa ket o fleustrerezh relijiel, peurliesañ, un emzoug mekanikel a gemplegerezh kevredigezhel daoust ma c'helle an elfenn-se c'hoari ur roll bras pe vrasoc'h

(1) 'Tabous et recettes'. (2) "Sokiologek". (3) 'Routine'. 'Tabou' a c'hellfe bezañ troet ivez gant 'hudverz'.

en o emzalc'h.

Setu un evezhiadenn gentañ. Hogen dalc'h ar vreuradenn stignet gant ar 'frankizourion' eo na c'hellan-me ket degemer. Goulakaat a ra ez eo ar 'frankiz' un talvoud pa n'eo nemet un devoud. Tonkad un den n'eo ket frouezh ur frankiz difetis hogen eus an implij a ra anezhi. Dre natur ez eo dieub an dud ha ma ne vijent ket dieub ne vijent mui tud ; rak dieub int pa sentont zoken ouzh mistri foll pe pa blegont da c'hizioù hudur dre ziegi, kerkoulz ha p'en em savont a-enep dezho ; dieub int p'en em aberzhont d'ar re all koulz ha pa aberzhont ar re all dezho o unan. Ha setu kalonnen ar gudenn : an darn-vuiañ eus an dud ne embregont o frankiz nemet o tibab o mistri (gant ma c'hellfent kaout meur a rumm da zibab) hag o selaou outo gant mui pe vui a c'hred. Da lavarout eo, stern ar frankiz a zo kevredadel atav ha frankiz an dud hag ar pobloù ne c'hoarvez nemet eus an asant a roont d'ar re a gemeront da aotrouion. O lavarout se ne fell ket din dismegañsiñ tamm ebet ar re a roo asant da vistri : se a reomp holl, n'eus forzh penaos ; ne ijinomp talvoud ebet ; pep talvoud a zo roet deomp dre ur gevredigezh. Ar 'rezid' difetis faltaziet d'ar frankizourion gristen kemplezhet gant tamallerezh reizhiadek al 'likourion' a zo ur vojenn hepken enta (e gwirionez n'o deus ar vourc'hizion digravez ijinèt an damkaniezh-se nemet evit stourm a-enep da gevredigezh an Iliz end-eeun, dre ma oa kevredet ouzh ar gevredigezh c'hladdalc'hel a felle dezho diskar). Hervez paotred ar rezid faltaziel-se avat e c'hellfe an dud dibab e gwirionez ar pezh a blij dezho, evel ma plij dezho, e Breizh, lakaomp, etre ar brezhoneg hag ar galleg, etre ar Feiz kristen hag ar feiz varksour pe faskour, etre ar c'hadaliezh hag ar vertuz h.a. Seurt rezid n'eo nemet avel ha faltazielezh. E Breizh, sur-mat, war dachenn ar yezhoù da vihanañ, ne c'hell ket an dud dibab etre ar galleg hag ar brezhoneg (hag, a-hend-all, e c'heller en em c'houlenn ha bez' en defe ur seurt dibab ur ster bennak)



pe, neuze, e vefe ret kelenn brezhoneg ha galleg dres war an hevelep pazenn, o lakaat, dres, war an hevelep renker mererezh, ha reiñ. dezho, dres, kement lec'h er yoc'hstlenn. Diouzh un tu all, beuzet ha maz eo an dud bremañ er sevenadur skiantelour-ergorelour ez eo dalvez goulenn diganto ober o mad eus o frankiz evit dibab Doue hag ar Feiz ; ar seurt dibab, adarre, n'en deus ster ebet ; koulz e vefe goulenn digant unan komz ur yezh han'en deus ket klevet ar ger kentañ anezhi. Ha ni hon unan, daoust ha n'hon eus ket degemeret an talvoudoù a zifennomp hiziv nemet peogwir int bet kinniget deomp gant an Iliz a oa neuze ur wir gevredigezh (pezh n'eo ket mui hiziv peogwir e tistro mui-ouzh-mui bemdez da saviad ur sektenn). Moarvat e weler tud o kanttreiñ ouzh Doue hag ar Feiz, re all oc'h herzel ouzh an amva kefredel ha speredel m'embait soubet enañ ; hogen hevelep degouezhioù a zo direol agrenn, dreistordinal ; harozed pe dud a ijin a zo gouest hepken d'ober dibaboù zo a-enep d'ar gevredigezh ; n'eus forzh penaos avat en em harpont war ur gevredigezh - dezhi ur gealiadurezh - ez eus bet anezhi en tremened ha labourat a reont e sell d'ur gevredigezh a vo anezhi en amzer-da-zont, hag a vo dezhi ivez ur gealiadurezh.

An dañjer a zo kuzhet er 'frankizouriezh' vojennel a ziskulian amañ ez eo an arvarouriezh ha na c'hell ket bezañ degemeret gant kristen gwirion ebet, an hini a damallen dres e deroù ar rannbennad-mañ. Rak neb a gred er 'frankiz' evel un talvoud ne gred e gwirionez e talvoud ebet peogwir e c'houlaka e c'hell an talvoudoù bezañ krouet gant an den. Evit kristenion a gred en Diskuliadur hag en dazroadur, en ur furnez a zo dreist d'an den e unan hag a zeu deomp dre ur gevredigezh krouet gant Doue hag a zo an Iliz, aotren d'an den ijinañ e dalvoudoù e-giz ma kar, hep ober dave ebet da Zoue ha da donkadur dreistnaturel an den, a zo koulz hag ober eus an Den, da lavarout eo, n'eus forzh peseurt kevredigezh krouet gant tud, Doue e Unan.


Kement-se, evel reizh, ne dalvez ket e rank an dud bezañ rediet da zibab ar mad ; rak, mar bijent rediet ne zibabjent, e gwirionez, netra (gwir eo ne c'hortoz ar galloudoù stadel nemet ur c'hemplegerezh diavaezel hepken hogen silvidigezh pep den a zo e kefridi an Iliz ne c'hell bezañ tizhet nemet dre ar rezid endeeun). Ar pezh a c'houlennomp hepken enta ez eo ar gwir evit pep den da grouiñ pe da zibab e gevredigezh (pezh na c'hell ober tamm ebet er gevredigezh emanvet frankizour pe emanvet sokialour), evitañ hag evit e dud rak n'eo ket reizh, da skouer, e rafe bec'h unan e-pad bloavezhioù o tesevel un tiegezh evit ma vefe graet estrenion eus e vugale a-benn ar fin (ar skouer-se a roan hogen re all a vefe tu da venegiñ);moarvat e c'hellfed kavout un diskoulm d'ar gudenn-se er gevan-gevreadelouriezh.

Evit echuiñ ez ensellin berr-ha-berr ur c'hraf all, hini ar stourm broadel e-touez Indianed ar Perou. A-benn ar fin e teuan d'en em c'houlenn hag-eñ n'eo ket aet Breizhiz pelloc'h war hent an adsavidigezh vroadel eget an Indianed-se ; stad ar 'stuzegezh' indian er ranndir-se a zo par da hini ar Vrezhoned en amzer Charles de Gaulle, kant vloaz zo. Anv a zo ahont a wareziñ ur sevenadur hag ur yezh evel hendraoù riez Perou, dres e-giz ar monumantoù a zo bet lezet gant gourdadoù an Indianed-se. Diouzh a zamwelan n'eus emsaver ebet e-touez an Indianed, da lavarout eo, stourmerion o chom war an dachenn hag o klask krouiñ pe adsevel ur vroad ; rak evit se moarvat ez eus ezhomm estreget ur folklor deuet da vezañ eno evel e Breizh un doare opiom, evel ar 'Festoù-noz' pe ar sonerezh 'folk' e Breizh. An amzer dremenet o tripal hag o vlej-al a zo kollet evit ar preder hag ar stourm ha se a zo ken gwir e Breizh hag e Perou an Indianed.



Y.O.







Skool: 1/2000 000  
 Hent:             
 Harzou: #####  
 Stêr:           



DAVET AR PRAD DU

Kounlevr gant YOUNN TROAL

Ar pellskrid kentañ o tont eus Jenev (Kreizenn an Divroerezh Europat) a gemenne e oa ret din gedal ur miz pad ha loc'hañ eus Cannes, dre vag, d'an 10 a viz Du 1974. Pell avat e kaven da c'hortoz dreist-holl pa'm boa lakaet em soñj sachañ va skasoù ganin a-raok an Hanter-Eost.

Setu, d'al lun 7 a viz Here, ur pellskrid all kaset eus Suis. "Feurmet ez eus un azezenn evidoc'h en ur c'harr-nij 'Lufthansa'... - ur c'hevredad al-aman - a savo eus Orly da seizh eur pergont." Ne c'hellan ket lavarout ne oa ket a bouez war va spe-red rak en dro-mañ ne oa ket kalz amzer da fringal. Tro er rod neuze ha yao da Gemper da welout buan ha buan euriou an tren evit Pariz. Ha grik ebet d'am c'hoarezed. Perak lakaat meur a hini da gaout d'am heul ur c'houk divalav pa n'eo ket ret ? D'ar meurzh e chome c'hoazh ganin ar vrec'h da lakaat a-enep d'ar vrec'h ! An hevelep ger evit ar c'hleñved hag ar bikurenn. Ul lamm eta betek apotikerdi Sant-Voran (Savorn, Sainte-Marine), kinnig va brec'h da vezeg Kombrid ha kas da Gemper da siellañ karned-melen an testenioù-brec'hidigezh etrevroadel. Amzer vrav a chome da ingalañ, etre daou sac'h, unan kein hag unan dorn, an tregont kiload pouez aotreet din evel divroer. An hini nad a nemet d'ober un droiad a zle kaout e walc'h gant ugent kiload. Un droiad c'hoazh betek Pont 'n Abad da glask had legumaj met n'eus ket kalz war ar marc'had d'ar c'houlz-mañ eus ar bloaz.

Ne c'haller ket lavarout e kousker c'hwek pa vezer war-nes mont da gantreal dre ar bed. Evelato, d'ar merc'her 9, da c'hwec'h eur, emamp war-sav, va breur-kaer ha me, evit tizhout porzh-houarn Kemper. Da seizh eur tregont e loc'h an tren davet Pariz. Ar vro a-bezh a zo soubet en ul latarenn wen Gourvezet eo c'hoazh ar saout er pradeier ; houidi gwenn a neuñv war lenn Rozporden. Ne skuizher ket o sellout dre ar prenestr, ken liesseurt maz eo ar gwelvaoù. Dizale e trec'ho boull aour an heol war ar vorenn, hag hi c'hoazh o vougañ ar bannoù. Da eizh eur e tremener e-biou da gloc'hdi pounner Kemperle.

Ur vamm gant he faotr hag he faotrez a red da glask privezioù na vo dañjer ebet da risklañ diouto er-maez eus an tren. Kaer en deus an tad klask dinec'hiñ e vab ne ra hemañ nemet pennfolliñ... Em c'hichen, daou gozhig a ziskenn bravik ganto o zamm bara, war-bouez lonkañ ur banne gwin a stag penn ouzh ar voutailh ; un taol trompilh, a lavare va zad eus an doare-se da evañ.

A-c'horre laez ar pont war ar Blavezh e verzer pegen brein eo an dour, warnañ un dienn hudur. An Oriant-Henbont. Mouezh ur paotr yaouank a sav eus ur c'hombod :

- Er c'hazarn em eus desket butuniñ...

- A, ya," eme egile, "eno em eus "losket"...

Na vil al labouradegoù ! Perak ne vefe ket brav, paneve kaer, nevedoù al labour pemdeziek ? An Alre, Gwened, da nav eur Kestemberzh. Echu diwar vremañ ar c'hloc'hdiou greunvaen : ur vegenn nemetken, warni ur gwiskad mein-skient. Nav eur tregont, Redon. Nag a zremmou damwelet, prim ankounac'haet ! Salv ma c'hallimp un deiz anavezout ha karout an holl dud e-barzh an Aotrou Doue !

Pegen ker boued ha braoued e diabarzh an tren.

Bara+silzig ruz=3 lur ; dour=3 lur ; bier=3 lur ; soda=3 lur. Ur vaouez noazh ledet war ur gwele, daouarn oc'h ober allazig d'he divrec'h, gant al lavarenn-mañ : "Un nozvezh en ur c'hombod-gwele." Ar Marc'h-Du e unan en deus ezhomm eus bruderezh gadal.

Laval : 11 eur 5. Le Mans : kreisteiz ha dek. Glas pep tra, leton dreist-holl. Boullou amañ hag a-hont ; mar ne fazian ket ez int avalou-sukrin, Savadurioù an atantoù a gavan kalz disteroc'h eget e Breizh. Rouanez e pep lec'h eo ar vrikenn ruz. Un eur hent diouzh Pariz e krog plaennoù ec'hon gant, du-mañ, du-hont, evel inizi brouskoadoù stank. Da drizek eur ugent, Trappes, Petit-Clamart, Versailles... Merket eo gant skritelloù bras emañ aze, pevar-c'hant metrad pelloc'h, kant hanter-kant diouzh an hent-houarn, kastell ar Roue-Heol ha n'eo bet morse nemet ur Roue-Bouev evit ar Vrezhoned.

An taksi am c'has davet turumell Menez-ar-Verzherion ("Montmartre") dres d'an nav a viz Here, gouel Sant-Denez, ar c'hristen a ziazezas ar gehinienn gentañ war ribl ar stêr Sena. Va blenier a anzav ouzhin penaos e tec'hfe ar c'hentañ ar gwellañ diouzh Pariz m'en defe tro da ziskoachañ un tamm labour all, kalz disteroc'h zoken, en e vro, du-se, war harzoù Breizh, stok ouzh Menez-Mikael. Un ifern eo deuet Pariz da vezañ o vezañ ma fell da bep hini kaout e dankarr dezhañ e unan. Hervezañ ez eo ret labourat unnek eur bemdez da c'hallout en em dennañ bravik, rak evel tireoul nemetken ez a gantañ hanter-kant lur bemdez-Doue.

Eus prenestr ar gambrig e-lec'h e tremenin an noz, toennoù ha toennoù betek an dremmwel. Eus derezioù penniliz ar Galon-Sakr, adarre toennoù ha toennoù, ken pell ha ma c'hall mont ar sell. Unan eus brasañ gwalinier ar bed a hiziv eo ar bras-kêrioù : an den graet ur verienenn anezhañ.

Ar wech kentañ eo din pignat e-barzh metro Pariz. Lavarout a ran "hini Pariz" rak e 1966 e oan bet azezet e hini Buenos-Aires, en Arc'hantina. Gras din bezañ bleniet gant ul leanez a lakaas ar bilhed em dorn da silañ en un toullig, o tont er-maez eus un toullig all hag o tigeriñ dirazon skin ur rod-kloued. Hag e c'hallit neuze diskenn dindan douar. Aze e tro un naer houarn, o lonkañ hag o tisonkañ tud, diehan. Tud dilavar. Tud dizanv.

Da serr-nnoz eta e savin war grec'henn "Montmartre". En daou du d'ar straedoù n'eus nemet ostalirioù ha staligoù, o tiskouez taolennoù. Livadurioù ivez war leurgêrig iliz kozh ar grec'henn. Feiz, ne glever ket kalz a c'hallig war ar blasennig-se. Paotred yaouank, barvek, hirtvevek, plac'hed yaouank a zo aze, o tivizout kenetrezo, o werzhañ o oberennoù, o livañ, o tresañ war ar prim an dremenidi a fell dezho : a-walc'h azezañ dirazo ur pennad mat, chom difiñv ha paeañ ar poltred peurechu. War blannenoù ar chanter, evit kempenn dismantroù ar bombezennoù stlapet ouzh ar penniliz nevez zo ez eo roget ha diframmet an holl skritelloù o c'houlenn dieubidigezh eskob gresian Yerousalem, Capucci, perak ?

Koaniañ a reer gant ar beleg "Fidei Donum", Charles Antoine, arbennigour war Vrazil, nevez savet ul levr gantañ diwar-benn strivoù an Iliz er vroad-se. Ur beleg all, dezhañ un toulad mat a vloavezhioù en Arc'hantina, a gomz eus Peron hag eus Izabelita. Anat eo n'en deus ket kalz a joa outo. Kontañ a ra penaos ez ae a-wechou trede gwreg Peron d'en em ziduiñ da unan eus boestoù-nnoz Madrid hag a ranke he gwaz kas unan eus e vignoned d'he c'herc'hat da zont d'ar gêr. Ur wech ne fellas ket dezhi plegañ

d'hec'h ozac'h ken e voe ret distagañ ganti flac'hadoù. Goulenn a reas avat digant he fried mirout ouzh ar floc'hig-se, re sentus, a bignat gant skeul ar c'hargoù. Ar beleg-se a anaveze ivez an hini a oferenne bep sul dirak Peron hag Izabelita. Aotre ebet da vezañ un dever-gouloù, prezegenn ebet morse ha pep tra distaliet dindan ugent munud. Yann Peron a zo ivez an den-se a ze gemeras ur mor a arc'hant evit bezañ bet sinet 6.000 aotre-tremen faoz bennak evit reiñ tu d'ur bern naziourion da gaout repu en Arc'hantina. Ur sabatur eo merzout penaos gwashañ enebourion Peron a chom kilhet gantañ.

Da c'hwec'h eur on darev evit tizhout Orly. Skrivet e oa bet din em boa ar gwir da sammañ 30 kiload a bouez ha setu ma ne fell da implijadez al "Lufthansa" merkañ war va bilhed nemet 20. Ret eo tabutal un tammig. Ar pellgomz a ya en-dro. War-raok atav : gwelet e vo. Pep tra eta war an douger-sammoù pederrodek. Lezel a reer ganeoc'h ar pezh a c'hallit dougen ouzh an dorn, gant ma ne vefe ket re bouner evelato. Da bep unan e roer ur baperenn wer, warni niverenn an azezenn. Pep hini a glask e gornig. Un tad a erru gant e vabig hag e fell dezhañ e gaout en e gichen. Setu ma c'houlenner diganin dilojañ. Dre ret e kred unan eus an ostizezed lavarout din ur ger bennak e galleg evit en em zigareziñ. Ur mell labous houarn eo ur "Boeing 707". Gant daou gombod, unan kentañ klas, ugent, azezenn ennañ, hag an hini eil klas gant dek-hapevar-ugent en un tu ha kement-all en tu all. A-us da bep treizhad ur goulaouig, un toullig-aer, un douchenn evit gervel an ostizez-rak teir a zo d'o heul-, ur mestr-ostel. Soñjal a ra deoc'h bezañ e korf ur pesk ramzel e gostezennoù toullet gant ur steudad lagadigoù-tan. Dirazoc'h,

e pep tu, en em astenn teir renkennad azezennoù don ha, du-se, ur speurenn, ur ouel en he c'hreiz evit disrannañ ar c'hentañ klas diouzh an eil. Em c'hichen div amerikanez kozh a soñjo dezho ec'h ouzon saozneg daoust ma n'eus grik ebet gannin er yezh-se : mousc'hoarzhin a ran hepken eus va seizh gwellañ.

Diouzhtu kerkent ha dibradet, ha se bep gwech, e vez displeget d'an dreizhidi, penaos analañ oksigen, penaos ober gant ar chupenn salviñ, mar errufe ur gwalldaol bennak. Diouzhtu ivez e stager da ober war-dro ho kof. Un daolig a zo dirak pep hini, a c'hallit pegañ ha dispegañ diouzh kein an azezenn diaraog. Dre drepas strizh ar c'hreiz e teu hag ez a eus an eil penn d'egile ur garrigellig o tougen meuzioù hag evajoù. Un tamm digor-kalon, da gentañ, ur sac'hadig pistachennoù-douar, hag ur werennad bier pe sug-frouezh pe win pe zour... h.a.

E-doug an nijadenn hir-se n'eus ket bet roet kalz a zisplegadurioù deomp da lavarout a-us da begorn eus ar bed edomp, pe eur e oa, pegen pell e oamp eus dibenn ar veaj. Div pe deir gwech ez eus bet goulennet diganeomp skoulmañ ar gouriz rak edo ar c'harr-nij o vont tre en ur barrad amzer fall. Hej a vez neuze gant al labous pa droc'h evel-se ur gorventenn louet ha teñval.

Ha setu poent merenn : dindan fri pep unan e leder eizh traig bennak e-barzh ur plad hi melen, silzig ruz, tomatez, fav, kig gant avaloù-douar, abrikez, keus, un tammig bara segal, amann, kafe pe de evit klozañ.

Dek eur bennak eo pa ziskennomp e Frankfurt. Nag ec'hon aerborzh ar gêr alaman-se. Ret eo din sevel ur bilhed all. Kaset on eus ur burev d'egile, gant nebeut tre a c'halleg evit ober

va zro. Ha c'hwenn zo em loeroù o klask niverenn ar riboul da vont er-maez. Frapad kentañ : Paris. Bil frapad : Paris-New-York. Ne chomer ket da ruzañ ; buan e tibrader. D'ur mare, en hon tu kleiz, er pellder, e lost gwenn arc'hantek oc'h en em zistagafi war an oabl glas glan, e kerzh ur c'harr-nij all war an hevelep tu ha ni.

Da drizek eur, ar re a zo arc'hant dezho - betek henn n'eus ket kalz a dud en dienez etre an neñv hag an douar - a c'hall prenañ evajoù, alkolioù, butun cheuc'h, danvezioù fichañ. Mont a ra fonnus ar boutailhoù hag ar pakadoù a-ziwar ar garrigellig. Un Indezad bihan a zis-pourbell e zaoulagad dirak kartoù tri c'hoarier hag a-daol-trumm e krog enno ha d'an daoulamm betek e blas e penn pellañ ar c'harr-nij.

Da bemzek eur ez eus da zibab etre un aval hag ur vananezenn. Da seitek eur nemet kard, koan ; kilhevardon, chug frouezh, te. An Indezadig a denn e deod d'an dud. Dalc'hmat ez eus monedone war-du ar privezioù, e lost ar c'harr-nij. E Paris ez eo naontek eur nemet ugent pa adkavomp an douar er Stadoù-Unanet. Avelioù a-benn a zo pennabeg d'an dale, un eur bennak. An dreizhidi, en o soñj mont larkoc'h, a zo dastumet, evel e kement aerborzh a zo, en ur sal-ged ha n'eus aotre ebet da vont er-maez anezhi.

Trede frapad : New-York-Guyaquil. An taol-mañ e klever spagnoleg hag e teu war wel pennoù melen ; en em gavout a ran muioc'h er gêr. Muioc'h a livioù ivez ; n'eo ket mui ken cheuc'h an dilhad. Pell amzer e pado c'hoazh an deiz. An heol en tu dehoù ; en tu kleiz runelloù koumoul gwenn kann, evel 'kaol dienn', o c'hournijal en ur bed glas mik. E-pad ur pennad

ez eus tu da welout an douar, douar drailhet, marellet gant parkeier melen ha glas, ha mor oc'h en em silañ er plegoù. Marteze Bahamaz, Kouba pe bPuerto-Rico. Nebeut tre a zisplegadurioù hag, ouzhpenn-se, alies e saozneg hag alamaneg nemetken. Ur gwaz a lenn ur gazetenn e lizherennoù hebraek. Ha dav adarre ouzh taol ! Daou ostiz hag un ostizez a astenn ur plad hir gant ur golo : kaol-fleur bihan gant saladenn, tammou eog, lipouserezh gant riz ha karotez, keus, amann, ur voullig vara, un hirgarrezennig a vara segal. Hir e kavan an amzer. Deuet eo an noz... Darn en em ro da gousket. Lutigoù ar c'hostezioù a varv an eil war-lerc'h egile. Met n'eo ket echu c'hoazh kargañ kof : chom a ra c'hoazh un dra bennak da lonkañ. En taol-mañ e van ar pladad kig eus va dilerc'h ; a-walc'h gant kilhevardon ha drailhennoù orañjez. Naontek eur eo gant bizioù orolaj Guyaquil, ur gêr vras eus Republik Ekwador. Amañ eo paourc'h ar stal ; n'eus lec'h ebet evit gedal. Goulenn a reer diganimp lezel ar pakadoù war dreuzoù ar sal-ged n'eus nemeti hag ez eomp d'en em veskañ gant tud all.

Pevare frapad : Guyaquil-Lima. Un eur hanter nijadenn. Rouez eo deuet an dreizhidi da vezañ. Mall eo gwelout penn an'imram'-se. Nebeut ha nebeut e koazh ar traoñv ; ne chom mui nemet ur c'hwitelladenn difraezh, damheñvel ouzh hini an aezhenn o flistrañ. Santout a reer an ardivink oc'h izelaat bravik, o tigrskiñ e dizh tamm ha tamm. Un dra bennak a chom c'hoazh d'ober evel bepred : reiñ da bep hini un torch berv soubet e dour eukalptuz, da freskaat ha da naetaat dremm ha daouarn.

Ouzhpenn unnek eur noz eo pa dremenan

dirak maltouterion nijva Jorj Chavez, Lima. Gant va sac'hadoù ha va arc'hant, diaester ebet. Ur c'harrig-samm am c'has betek kreiz kêr. E goueled ur safar an diaoul en em silan etre liñserioù mouest ar gwele. Lima a zo ganti an hevelep cholori noz ha pemp bloaz zo. Roc'hadennoù skrijus kefluskerioù ar c'hirri-samm hag ar c'hirri-boutin kozh-Noe, youc'hadennoù diehan ar c'hornioù-boud, skrignadennoù ar starderezioù ; re skuizh on evit kousket mort ; hag, ouzhpenn-se, ar c'hren-douar ; div wech en santan e-kerzh an nozvezh kentañ. Ur spouron na baouez ket a zo krog e bouzelloù al lodenn vrasañ eus annezidi Lima hag he zrowardroioù. Rak start eo bet barrad ar yaou 3 a viz Here 1974. "Ouest-France" a gomze eus tri-ugent den lazhet. E-kreiz Lima e weler atredoù berniet amañ hag a-hont, a-hed hag e korn ar straedoù, ur savadur diskornet bennak, ur voger kouezhet... Gwashoc'h eo bet e lec'hioù all ; bemdez, koulz lavaret e kren an douar adarre.

Ne dremenin ket eizhtez e Lima. Da sul edon o kenlidañ an oferenn gant person ar "Recoleta". Hag ur vaouez e traoñ an iliz ha leuskel ur youc'hadenn. M'ho piye gwelet ar strollad fideled, a-unan, oc'h en em deurel war an norioù. Sederat avat gant an Tad Alfred e chomjont da beurechuiñ an oferenn.

Amzer am eus bet da vale dre straedoù kêr : netra nevez evit va daoulagad din-me. Nemet un enskrivadur iskis bennak : "An hipied er-maez eus Perou!" - "Indios sucios!" ("Indianned lous!") Ar wech-mañ on aet evit an eil gwech da welout "bariadaoù". Displeget em eus meur a wech petra int. Ma ! Puchit war ul leur-zi douar

ha lakait kichen ha kichen boestoù-sukr goullo, roget ha diroget, freuzet ha difreuzet, betek goleiñ al leurenn bouldrennek-se. N'ho po ket c'hoazh kroget da santout petra eo un doare ken euzhus da vevañ, d'en em lojañ. Ma vije c'hoazh ur blantenn ! Ma vije ur barrad glav ur wech an amzer da zistanañ ! Nann, poul-trenn ha lastez nemetken ! Hag an heol dispan ha dizamant ! Un dizamant a lezenn a zleje bezañ ivez evit lakaat harz da greskidigezh ar braskêrioù. En em c'houlenn a ran evelato ha ne vefe ket krisoc'h eget ar "bariadaoù" e Lima : ar "c'hcallejones" an hini e vefe neuze. Graet em eus ur gwel da unan en taol-mañ. Ijinit, e-kreiz ur strollad tiez bevennet gant peder straed e stumm ur c'harrez, ur c'harter diwelus. Rak a-dreñv ar savadurioù a c'hall an holl parañ warno o daoulagad emañ al lojennoù-se, al lastez-tiez-se a ranker tremen dre un nor vras evit gouzout emaint aze. Ezhomm ebet lavarout emaint an eil war-c'horre egile, stag-ha-stag, gant ur straedig teñval o vont eus an eil penn d'egile. Evit c'hoari n'o deus ar vugale nemet al lec'h flaerius-se. Pep tiegezh en em guzh hag en em gloz e-giz ma c'hall. Un duellenn nemetken en ur penn, un toull-lastez nemetken ha babiged diouzh an druilh. Ha koulskoude, en ur c'hustod, stok ouzh an nor-dal, ur Werc'hez e-kreiz bleunioù ha gouloù.

Evit echuiñ un draig c'hoazh a-zivout ar gêrbenn vougus-se, sur-mat unan eus ar c'hêrioù ar muiañ saotret er bed. Ar straedoù n'int nemet ur vogedenn : kement a dangirri ha n'eus anezho nemet atredoù ! Deiz ha noz ez eo flaerius an aer : c'hwezh an tireoul devet. Nepred ur mouchig-avel. Morse ur berad glav. Dre chañs

n'eus ket c'hoazh labouradegoù a-vil-vern. Amañ, kement ha ma c'hallan e ran brudererezh a-enep da Lima, evit lakaat ar re yaouank da chom en o menezioù glas e-lec'h maz eus, daoust da bep tra, un tamm muioc'h eget poul-trenn da lonkañ !

+++++

Merc'her - 30 a viz here 1974. Hervez ur c'houer anavezet mat ganin, ez eus bremañ kalz nebeutoc'h, dre amañ, o chaokat koka. Anzav a ra ouzhin en deus-eñ kemeret ivez an dram-se, p'edo o trevelliñ er mengleuzioù aour. Ha se gant aon da gouezhañ klañv, da welout ar vein o tisac'hañ war e benn.

Hervezañ ivez, ar re a chom a-sav d'en em zramañ, a glañv, terzhienn warno. Lazhet e vezont gant ar skuizhder ha naon du a grog enno. N'eus nemet an drederenn eus ar re yaouank hag a rafe c'hoazh gant an delienn-se. Ouzhpenn-se, ker ruz eo deuet ar c'hoka da vezañ: 14 lur ar c'hilo. Abeg mat da zilezel ar chaog-se.

E-pad va c'hentañ krogad, em boa klasket diorren gounezadur al lejumajoù. Chomet ez eus un dra bennak, rak, er beure-mañ, ez eus deuet ur vacuez da brofañ din peder saladenn eus ar re denerañ a c'haller da gaout. Merzet em eus e oa laouen o tiskouez din e oa bet kendalc'het ar pezh a oa bet boulc'het gwechall.

Yaou - 31 a viz here. Dec'h on pignet war gribenn ar menez da welout e pe stad edo ar vered, rak da Ouel an Anaon, emañ ar c'hiz mont di da lidañ an Oferenn. Sabatuet-mik on bet o welout eno ur pikol bez. Lavaromp kentoc'h ur pikol bern simant, ledan ken ma oa. D'an abardaez, e c'houlennis digant ar baotred ar penaos hag ar perak eus ur seurt savadur. Bez ur baotrez an hini eo. Dre wall zarvoud he doa en em lazhet er menezioù. N'eo ket bet lakaet he c'horf en douar; gwisket he arc'h nemetken gant meur a sac'had simant. Hag an dud eta, o welout ur bez ken bras, zo staget da gredañ en doa kresket he c'horf goude he zremenvan.

Sellout a ran ouzh an distouwer prenet

ganin; graet eo bet e Shanghai. E Lima em eus gwelet e pep korn bernioù levrioù ha kelaouennoù, bruderezh ganto evit Sina Mao. Faotr yaouank lemañ an tachad, Salomon e anv, en deus koumanantet, evit un nebeudig gwennaen, d'ur gelaouenn spagnoleg, kaset dezhañ eus Pekin, e-pad daou vloaz. Va zommez nevez prenet evit keginañ gant tireoul (petrol) a zeu eus Portugal hag ar gontell eus Alemania. Va metr eo merket warnañ Tchekoslovakia ha va heskenn Alemania.

Lun - 4 a viz du. Ar re a oa dezho kerent marv eus an eil Kala-Goañv d'egile, n'o deus ket c'hoazh echuet "frikotañ" gant o anaon. Endervezh Gouel an Hollsent, o deus staget da fichañ un daol en o zi, ur c'hased war ar penn anezhi, evit merkañ, d'am menno, lec'h penn ar c'horf-marv. Pep tra e gwenn, kurunennoù prenet, gouleier a bep seurt, taolennoù treset warno anv an hini aet da anaon, gant un arc'h en e gichen un ael, ha boued, evajoù a bep seurt da reiñ d'ar re a zeu da bediñ. Da ouel an Anaon eta, omp pignet betek unan eus ar c'hribennoù, a-us d'ar gêriadenn, lec'hiet eno ar vered. Ul lid a zoare e gwirionez. Un oferenn etre an neñv hag an douar... Ur gwel dudies war al leinoù all, war an draonienn, war an hent o kammigellañ e-harz hon treid, war ar ster. Soñjal a ra dezho e chom an ene da gantren, eizhtez tro-dro d'e gerent, a-raok kejañ gant Doue. Krediñ a reont e teu an Anaon evel-se da glask an arc'hant kuzhet gantañ e-doug e vuhez war an douar. Ar gredenn zo ganto e tleer beilhañ an ene, eizh devezh ha dreist-holl eizh nozvezh. Klask a ran, gant skoazell va frezeger keshwaek, reizhañ o feiz, hep dismantriñ ar pezh a zo mat, ar pezh a zo da virout. War bep bez, e skuilhan dour benniget, gant ur bedenn verr, e kes hwaeg, evit pep anaon, o reiñ e anv da bep hini.



Diskennet d'ar presbital, ur souezhadenn eo bet evidon, degemerout digant div familhur sac'hig plastik, seizh traig hag ouzhpenn e pep hini : un ananezenn, ur pakad skaottenoù, ur voutailhig sugfrouezh, un tamm keuz, vioù damboazh, bara dous, stummoù liesseurt dezhañ : lamaed, balafenned, traoù all ne c'hellan ket gouzout petra int. Siwazh, ar bara-se zo deuet da vezañ gwall gras. Evel-se e vez graet : lodennañ kement a chom etre ar amezeion, etre ar re zo deuet mat d'ar familh e kañv. Goude-se, e touger ar c'hurunennoù hag ar c'hroazioù d'ar vered. Ha bec'h d'ar boued, d'an alkool, d'ar c'horoll, d'ar c'han...!

Goulenn a ran digant Gregorio, kollet gantañ e wreg yaouank Asuncion, o lezel war he lerc'h daou vabig, perak ez eus gantañ an dilhad-se.

- Ur bloaz-pad, emezañ, emañ ganimp ar c'hiz d'en em wiskañ e du. Ha tremen tri bloaz, e c'haller addimeziñ : al lezenn avat a ya d'an traoñ.

N'eo ket mezv Gregorio, e grouadur diwezhañ gantañ war e vrec'h. E dud avat o deus tri devezh ha teir nozvezh gouel...!

Gwener 8 du 1974 - Ur pennad amzer zo, ez eus un tamm sklerijenn a-hed ar c'hant metrad hent-bras a dreuz ar gêriadenn. Ur gouloù ivez e-barzh un tri-ugent ti bennak. Dre c'hrad ur c'heflusker paeet al lodenn vrasañ anezhañ gant Bro-Suis. Da 6 eur e krog da frac'val, salutet gant youc'hadennoù ar vugale : "Luz...Luz...!(sklerijenn), ha da 9 eur e vez lazhet. A-us d'an aoter ha d'an nor-dal, e oa bet staget lampoù ; er presbital, hini ebet. Eizhtez on chomet gant va goulaouenn grenus : en abardaez-mañ avat, emañ ganin "gouel ar sklerijenn"

Sul 17 du 1974- Setu echu ar privezioù hag ar gambrig-kibellañ, harp ouzh an iliz, a-gleiz d'an nor-dal. Div granenn a gutuilho doureier an doenn. Me 'lar deoc'h n'eo ket un dudi, pa ranker, d'an nebeutañ, ur wech bemdez, ober van da gregiñ gant ur valeadenn war an hent-bras, da bellaat diouzh an tiez evit kaout un "neizh" bennak, en ur enebañ ouzh an diribin serzh... Den amañ n'en deus seurt "lochennoù" ; bec'h eta d'ar bourmenadenn bemdeziek. Ha bezit war evezh ouzh hoc'h hent, mar ne fell ket deoc'h livañ ho potoù ha degas ganeoc'h "frondoù" d'ho ti...

Merc'her 20 du 1974- Pemzektez 'zo on aet da woulout korf-marv ur paotr-yaouank anavezet ganin pemp bloaz zo. E gavout a ris astennet war dreujennoù bambouz, dastumet en ur poncho aet da druilhañ, gant ur sae zu, gourizet en e zargreiz gant ur gordennig wenn, evel ur manac'h. Fellout a reas din gwelout e vizaj. Pa savis korn ar poncho, e oa ouzhpenn ur maskl kotoñs du o kuzhat dezhañ e zremm. Ne gredis ket goulenn lemel an tamm danvez-se.

Derc'hent-dec'h, edon o tilouzañ delwenn an Itron Varia ha petra a ziskoachis, bountet din-dan traoñ he sae, e-kichen he zreid...? Div gu-chennadig blev du-pod.

E Kuzko ez eus un draonienn ma c'hounezzer enni ur ouenn vaiz : hini gwenn, ar gwellañ da zebriñ. Gwerzhet e vez a-bezh da Japan.

Lun 25 du 1974- Disadorn da noz, edomp o komz eus ur frouezhenn, stumm ur berenn c'hlas dezhi, en he c'hreiz, ur pikol maen, blaz kistin d'he boued hag anvet e galleg "avocat". Hep ur minc'hoarzh war gorn e vuzelloù, ur paotr yaouank da lavarout din : "Arabac'h d'ar babiged sankañ o dent er "palta" (alvokad e spagnoleg), dreist-holl, pa

n'eo ket c'hoazh darev, anez da-se, ne c'hall ket distagañ mat kastilhaneg. Luziañ a ra an teod..." Petra a wir en ur seurt turmud ? Pezh e zo fraezh er gredenn-se eo arallekadur divent ur bobl sujet d'ur stuzegezh all. N'eus droug ebet pa vez seizet teod ur bugel evit komz keshwaeg. Ur walenn eo ma vefe strobet paz eo ret distagañ kastilhaneg.

Dec'h on pignet betek kêrig un tiegezh yaouank. Lavaret e oa bet din ne oa ket tu da denna avaloù-douar eus an tachad-mañ. Hag em eus gwelet eno patatez dereat ha puilh. Pezh a ra dicouer d'an dud, amañ, eo klask ha soñjal.

Tennet eus ar gelaouenn : PASTORAL ANDI-NA (Pastoralezh Andinat), niverenn 4 here 1974. Un droidigezh ger evit ger eus lodenn un diviz enrollet war vinikasedig e Atapata, e brò Kuzko. Fal-tazi pe hengoun ur c'houer a 86 vloaz ?

Bouzar on. Da fall eo aet va daoulagad ; n'em eus mui dant ebet. Ne chom mui ganin nemet ar c'hoka-se, ma oa boazet Mari Meurbet-Santel da zantañ. En abeg da-se, ar c'hoka-se eo va boued, va c'hafe, va fep tra. N'eus nemet ar c'hoka-se a dalfe din. En trubuilhoù, el levezonioù, aotroù, e tremenan va buhez o tebriñ ar c'hoka-se nemetken.

- Ac'hanta, Mari Meurbet-Santel a chaocke koka ?

- Ya, chaocket he deus.

- Perak 'ta e chaocke ?

- Glac'har he doa gant he mab, Jezuz. Kollet he doa he mab, Jezuz a Nazared, ganet e kêr Jeruzalem (Yerouzalem). Eno e kreskas he mab hag e kollas anezhañ. Kerzhout a rae en ur ouelañ warnañ, hag e kreiz he foan divent, he doa beget un delienn ben-nak eus ar wezennig-se. Setu perak eo ur frealz evidomp hag evit an holl chaokat, pa vez bec'h warnomp.

- Ha petra c'hoarvezas, pa chaockas koka ?

- Un disamm e oa eviti en he doan hag en he gouelvan divuzul. Hag evel-se, sederaet, e kavas he mab.

"Perak, emezi dezhañ,"selaou va bugel, perak en em gollez evidon ? Eñ neuze : "N'en em gollan ket:Urzh zo bet roet din gant va zad hag ar pezh a zo bet lavaret din ober gant va zad eo ret din hen seveniñ; bremañ ez in ganit." O lavarout se, ez eas ganti.

E-giz-se eta he deus Mari Meurbet-Santel debret koka ha ni ivez e yenijenn ar "puna" a zebr koka nemetken. Ar Werc'hez avat n'he doa ket chaocket; dantañ ne reas ken. Anat eo ne reas nemet kregiñ e-barzh, evit kregiñ e-barzh. Feiz, n'he dije ket chaocket evel don ?

- C'hwek eo ar c'hoka ?

-C'hwek eo, aotroù. Evel pa vije graet evit yenijenn ar "puna". Uhel emañ amañ, kalz evel ez eus, kalz erc'h ha kazarc'h, kalz poanioù.

- Ha perak 'ta e vez c'hwek a-wechoù ha c'hwerv a-wechoù-all ?

- Ma, e-giz-se eo, aotroù.

Sadorn 30 du 1974 -

E-kichen an iliz, war an uhel - pep tra zo amañ war an uhel, rak n'eus netra rez-ha-rez - ez eus ur wezenn, pleget he bodenn a-zioc'h an hent. Ul loj-yeer eo. Gwechall ivez e kêr va zad, du-se, etre Pont 'n Abad ha Tremeog, e oa evel-se.

- Setu petra a stager da zizoleiñ :  
" An dud a sant emañ o stuzegezh (kultur) en arvar da vezañ dismantret gant levezonioù ha gallou-  
doù estren. Gant taolennoù-labour ar gouarnamant hag  
ar brevezidi, an annezidi n'en em santont ket digabest  
bestr evit spisaat o dazont ; er c'hontrol, douget  
int gant ar gallouoù diavaez-se da zisprisout o stu-  
zegezh dezho ha da zegemerout dre heg un diorroadur  
lakaet warno. "Merzhed eo bet kement-se gant ur

strollad eus Camacani, war ribl al Lenn Titika, e bro an Aymaraed. Ha divizet eo bet gant an holl izili komz yezh ar c'helc'hiad douar.

PASTORAL ANDINA -niv.4 here 1974

Lun 2 kerdu 1974 - Daou grouadur yaouank he deus Modesta.

- Va gwreg, a c'houlenn Candelario, he gwaz, he deus c'hoant da chom a-sav da gaout bugale. Daoust hag ur pec'hed eo kemerout louzoù evit kement se ? Merc'hed a ya da San Juan (e San Juan, ez eus d'ar mare-mañ, ur mezeg eus Suis Alamanek) ha gant ur bikurenn e vezont distrobet eus ar vugale a zou-gennont."

- Zavier Grall, e niverenn 1523 LA VIE CATHOLIQUE, a lavar dimp : "Ha ma vefe ret din kuitaat Breizh, sur-mat ne vefe ket evit mont da Bariz, met d'ur gêriadenn verberat pe d'ur vourc'hig andinat." Ma, keneil broadelour, a Vreizh on deuet da chom en ur vourc'hig andinat, hag eürus on. N'on ket avat a-du ganit, pa lavarez goude-se : "An den n'eo ket ar grouadelezh a-bezh. Bez ez eus ar c'hi o kantreal hag o tiwaskañ... Din-me e plij kalz ar re a oar kaout darempredoù hegarat gant ar chas hag an avelioù..." Zavier, gra un dro, dre ar bed, da ober ul listenn eus ar re o deus roet o c'halon d'ar chas, ha deus da lavarout din pegement anezho o deus c'hoazh ur c'hogn eus ar galon-se evit goudoriñ, e gwirionez, an den, o breur ! Amañ ez eus chas o kantreal hag o c'houzañv... Chas askornek, chas truilhek, chas 'pad an deiz o furchal gant an naon, chas oc'h en em zrailhañ kenetrezo. Chas a vir ouz-hoc'h da gouskat, chas pennabeg a gleñvedoù, paz eus endev re a gleñvedoù. Ar chas en o flas ! Re a chas didalvez zo er bed, o tebriñ ul lodenn eus kalon an dud, o tiframeañ un tamm kalz re vras eus hez digant an dud. En an' Doue, ar chas en o flas ! E Keroual hag e Yanahuaya !

Sadorn 7 kerdu 1974 - Ur beleg barzh he deus bre-mañ Amerika Latinek : Ernesto Cardenal an hini eo. Ganet eo e Granada, e Nikaragwa. Goude studioù prederouriezh ha lennegezh e Meksik hag e Stadoù-unanet, e kemer perzh er stourm a-enep da Somoza, diktatour gwadus e vro. E-giz dre vurzjud, e c'hall tec'hout eus an toullbac'h. Ha n'eus mui liv anezhañ e-doug meur a vloavezh. E 1960, ez eo ur sebezenn e adkavout erfin... nann e-barzh ur strouezheg dispac'her, en un Trap avat, un Trap eus Kentucky, e Stadoù-Unanet. Tamm ebet ur froudenn verr ! E 1966, eo beleget Cardenal ha ne voe ket pell o tiazezañ ur gendrev, anvet gantañ "kumun (ploue) gristen", war enezenn Solentiname.

Uhel e sav an ton, barregezh hag hiraezh a zo gantañ evit lidañ ar pezh a anver an "indianezezh". Lean maz eo, e ro koulskoude meuleudi da relijion e hendadoù, ur relijion graet pagan anezhi, a-hervez :

"N'ouien ket pouezañ...  
Azeuliñ a raent an amzer, ar red kevrinus-se red an amzer...  
Nevet e oa an amzer. Doueoù e oa an deizioù."

Hervez ar barzh, ne oa ket nag acour na brokerezh e buhezgezh an Amerikaned. Gweneg ebet. Banker ebet. Evit an arz, ar c'hehelerezh, ar c'hin-klerezh e oa ar metal prizius.

"O livañ hag o tresañ, e laboure an Inka.  
Kouezhet en he boull an Impalaeriezh,  
an Indian en deus puchet evel ur bern ludu  
ha n'en deus graet tra all nemet soñjal  
diseblant ouzh ar skraboù-oabl  
ouzh an Emglev evit an Araokaat".

Merc'her II a viz kerdu 1974 - C'hwec'h vloaz ec'h anavezis anezhi er skol : mamm eo bremañ Euzebias, 22 vloaz dezhi, daou vabig bev hag unan marv d'e zaou viz. Emañ-hi, en he c'hoazez dirazon, he bugel war he c'hein... Hag a-daol trumm, e tacubleg

evel spontet war-du ennon, he dorn o klask pakañ un dra bennak war al leur-zi. Petra an diaoul ? "... ul laouenn, emezi, ul laouenn !" Evel pa vije bet un euzhvil bennak o vont d'am zagañ. Etre he daou biz-meud, e roas taol ar marv d'an aerouant.

- Fromus-kenañ eo an daolenn miret e presbital Flourin hag embannet e LIZIRI BREURIEZ AR FEIZ - gouere-gwengolo 1974 - Kenavo ar misioner. Dindan e karfen skrivañ al linennoù-mañ :

Ul lestr acour en deus Tad Jezuz Krist,  
ul lestr acour en ur c'horn eus e Varadoz,  
Ennañ a-vil vern (den ne c'hall o niveriñ)  
diamantoù strinkellikus  
daerennoù mammoù, tadoù, breudeur, c'hoarezed  
daerennoù Brezhoned.

Ar mab, ar verc'h a ziframme o gwrizioù glas  
eus glen ar vro,  
e-kreiz o brud  
da vrudañ ar Garantez.

Hag ar Garantez a vir ar gwerennadoù dour roet  
a ziwall dour klouar daoulagad ar Vrezhoned  
evit deizioù du o flanedenn :

Glav distanus a raio war Vreizh.

Sadorn 14 kerdu 1974 - Amañ eo bet lidet, hiziv, Deiz ar Gevelouriezh (Coopérativismo). Adal c'hwec'h vloaz zo bennak, en em skign, a-hed ar stêr Tambopata, kevelourioù kafe. Evit e sec'hañ hag e werzhañ. Dres a-us d'an iliz, ez eus, e Yanahuaya, ur siminalig, gwintet war ar gêriadenn ; siminal keflusker ar sec'herezh-kafe an hini eo.

Unan eus an izili a lavare din, an deiz all, eo bet paet, er bloaz-mañ, 1 700 soles (170 lur nevez) ar sac'had 100 kilo ezporzhiet. An drederenn a chom er vroad, evit 1000 soles. Dec'h da noz eta, o deus staget gant an abadenn son-sklerijenn : gouloù flammerennoù gant ton ur c'horoll,

bepred an hevelep hini, sonet gant ur bagad fletoù Pan. Teir gwech o deus graet tro ar blasennig, a-dreñv ur skritell lien hag ar banniel, fur an tamm anezho, pep hini gant e vazh, eouldouar o teviñ er penn anezhi. Bep an amzer e laoskent ur youc'hadenn hag e taolent strakerezed, gant un ehan e pevar c'hogn al leurenngêr. N'ouzon ket perak, kerkent stlapet, en em daole warno ar baotred d'o bresañ gant o zreid.

Er mintin-mañ, goude ul lid en iliz- n'em eus ket lidet an Oferenn - emvod dindan ar c'hoc'hu. Edon em azez etre ar barner hag ar sarjant. Ur wastell a gemeran diwar ar plad, ar "champagn" a lezan. Buedenn dreut an abadenn a c'haller lavarout, hep flemmañ an disterañ, eo ar roll, lennadenn ar roll, kinniget dalc'hmat gant an hevelep gerioù. A-hendall, e vez graet gant ar pezh a zo hag e-giz ma teu. Ur rener bennak a sav en e sav, evit distagañ un toulladig gerioù na vezont entetet gant den hag a azez en ur c'houlenn digareziñ ma n'eo ket dibistik ar jeu. Ur c'houer a lenn ur baperenn a-zivout ar gevelouriezh : falloc'h eget ur skoliad peurechu gantañ e gentañ bloavezh. Un all a gomz keshwaeg, en ur c'houlenn pardon a-raok ha goude da ober gant e yezh ! Deuet omp war ar blasenn, evit sellout ouzh ur redadeg mirc'hed-houarn : daou ha daou, pemzek tro da bep hini. A, ankounac'haet am boa reiñ, da anavezout ez eus bremañ un toullad roffsed-houarn dre amañ, hag evit ar wech kentañ, e farder ar c'harr-se e Bro-Perou. Bet on bet eus ar re gentañ, e 1967-68, oc'h ober hent gant ur seurt benveg, etre San Juan hag amañ. Mil gwech gwelloc'h avat eo ar re yaouank egedon ; ar re-mañ ne ziskennont morse, daoust ma n'ez eus, koulz lavarout : nemet krec'h p'emeur gant an distro eus an "traoñ". Hag aes eo da vezout : Pep tra a ya war-ziskenn peogwir eo hent ar "selva", al lodenn eus ar c'hevandir(douarbras),rez-ha-rez gant ar mor.

Meurzh 17 kerdu 1974 - Bilban, ur mous 14 vloaz, penn-boul, daoulagad lemm dezhañ, zo e toull va dor. Hag e ran outañ goulennoù diwar-benn e diegezh.

- Ur breur bihan din zo marv, warlene, d'an oad a sei vloaz...

- Ha petra zo bet graet ?

- Lakaet eo bet war un daol ha staget dezhañ ouzh e skoazioù eskell kartoñs...

Ur bugel badezet, a varv a-raok an oad a furnez, a ya d'ar bed all digailharsae wenn e Vadeziant. War gement-se eo diwanet ar gredenn e teu ar babiged-se da vezañ aeligoù e Baradoz Doue. Amañ evel e Breizh.

- En noz-mañ on bet dihunet a-daol trumm, war-dro 10eur30. Gant trouz ha sklerijenn : ul lamp zo amañ, dezhañ ul lufur dibar. Ne oa ket bras ar strollad, ur gwaz, un nebeut merc'hed, ur guchennad bugale. An troer-pladennoù lakaet war dal ur granenn (1) tireoul, yao da goroll ! Gant an uhelgomzer o youc'hal ken kreñv ha ken kreñv. Ne ouzon ket c'hoaz ar perak. Adal 8 eur eo kousket al lodenn vrasañ eus an dud. Adal 9 eur e lazher keflusker an tredan. Pe abeg d'ur seurt froudenn ? Ur froudenn na zalc'h kont ebet eus kousk ar re all : den ebet amañ n'en deus preder gant se. Pep unan a c'hall ober ar cholori ma kar penn-da-benn an noz, ne gavo morse ar cher ebet war e hent. Ha koulskoude ez eus c'hwec'h bennak amañ ha n'o deus nemet ur straed da veilhañ ha pemp kammed evit tizhout kement ti a zo e-barzh ar gêriadenn. Met pa sonjan mat, e Breizh eo heñvel-poch. Penaos 'ta e tisonk ar salioù-dañs hag ar boestoù-noz o yaouankizoù drammet ? Ar c'hevridigezh ioù pagan zo heñvel-mik e pevar c'horn ar bed.

(1) cylindre.

gwener 20 kerdu 1974 - E 1940, Portugal a reas gant an Iliz un "Emglev Misionel". Hag adal ar bloaz-se, e-kerz un tamm mat a amzer, en em ziorroas pep tra e peoc'h. Ar pal a oa "portugalekaat" ar vugale mozambikat hag angolad. Gant ar Sened-Meur Vatikan II e tigoras an daoulagad. Fellout a reas d'ar visionerien krouiñ un Iliz ("nativa") kenelel evel er peurrest eus Afrika.

(YA - 22 gwengolo 74). Daoust ha digeriñ a reomp hon daoulagad e Breizh ? E miz eost 1974, en un danevell-skrid, eskibion Mozambik o deus anzavet o faziou kent hag o sioulder hag e lavaront bezañ prest da reiñ o dilez.

Sul 22 kerdu 1974 - Salomon, 23 vloaz dezhañ, unan eus ar barrekañ katekizourion a oa aet gant e vreur d'ober un dro betek Ayaviri, c'hoant dezhañ gwelout penaos staliañ ur vilin-dour stok e di, a-benn kaout un tamm tredan da dennañ e atant eus an deñvalijenn. Gant an distro eo kouezhet warno ar "recluta", da lavarout eo ar skrap war ar re yaouank, d'o lakaat d'ober o servij. O vezañ m'eo un dihun a baotr, en deus sachet e skasoù gantañ o reiñ 5 lur d'an archer. Hervezañ, hemañ eo en dije goulennet ar bilhed digantañ. Ne vern, en un tu bennak ez eus breinadur ha prenadur.

-Testoù Jehova a ra ivez o reuz dre amañ. E rannvro Kanchis, e trowardroioù Kuzko, darn n'o deus ket hadet, ar bloaz-mañ hag o deus tennet o bugale eus ar skol. Un diouganer a brezege dezho edo dibenn ar bed war-nes erruout. Doujañs zo da gaout evit feiz ha kredennoù ar re all : goulennet eo gant an aviel. Evelato e c'heller ivez, gant karantez, teurel ur sell war gelennadurezh ar re all ha chom hep bezañ a-du ganto. Dreist-holl, p'o deus ar c'hredennoù kement a bouez war buhez ar bobloù.

(hervez Kannad Preladelezh Sikuan du 1974)

yaou 2 genver 1975 - Iliz ha presbital a ro boe d'ur guchennad vat a eskell-kroc'hen. Alies, e-pad noz, o c'hlevan o tispac'hañ dindan an doenn pe o c'hounijal a-us d'am penn. Dec'h d'ar pardaev, oa kuzhet unan war leur an iliz. Ur gwaz a red war he lez - O, emezañ, ar gwad...

N'am boa ket meizet mat. Soñjal a rae din bezant ententet e sunent gwad an dud. Hag e felle din e zifaziañ en ur zisplegañ dezhañ ne oa nemet ar vampire ('sunerion-wad') oc'h ober se.

- Nann, emezañ, an dud amañ, pa ne dro ket mat o fepa vezont mezevellet, a lamm war al loenig-se, a droc'h dezhañ e benn hag a ziskarg e wad tomm en o c'horzailhenn.

lun 13 genver 1975 - Ur brezhon, pa soñj en Douar ne soñj ket en ur vamm : gourel eo zoken ar ger-se. Gant an amerindian eo santet, doujet, karet, evel ur vamm, evel ur vagerez ; anvet eo gantañ DOUAR SANTEI e kastilhaneg, PACHA MAMA e ketchoua. PACHA n'eo ket an douar-labour, avez gwelet ha dornatet, ar BED kentoc'h, ur bed buhez ennañ, ur dra vev, " a vev evel-domp-ni, a blij dezhañ ar bleunioù, gwin, alkool, delioù koka ; war e dro ha war evezh outañ e ranker bezañ." Ha setu perak va ficher-blev a lavare din, a deiz all : " En tachad-douar du-se, a zo hon hini, e treut bremañ an eost : ne ro ket an douar, peogwir n'avez ket mui "paeet" d'an Douar. A-raok e vezemp a-unan oc'h ober ar c'hinnig-se " Bev bepred an henrelijion neketa ?

meurzh 21 genver 1975 - Disul e varve, en ur wiliou diñ, ur vamm a c'hwec'h krouadur, yaouank c'hoazh. Pevar c'hlañvdiour, war he zro koulskoude, an holl r a oa er gêriadenn d'ar prantad-se. Perak ur marv ken trumm ? Ur pennad a-raok edo oc'h ober he c'hefridio war al leurgêr. Unan eus " erluskerion (1) ar yec'he (1) promoterion

a lavaras din dec'h vintin e oa marvet " peogwir e oa chomet re bell da c'hortoz ar bouilhoñs, emañ ar c'hiz reiñ diouzhtu d'ar vamm, kerkent ha ganet ar bugel."

Dec'h eta, o deus douget ar c'horf d'an iliz : ar wech kentañ din da welout se amañ. Graet bravik e oa an arc'h, livet e du. Penn-da-benn an noz, taolioù morzol ar c'halvez ne ehanjont da dregerniñ er sioulder. En un toullig evel hemañ, un darvoud eo, e gwirionez, un douaridigezh ; an holl oa en iliz, an holl a yeas da heul betek ar vered, an holl o doa pemp eur da "goll". War-bouez teir c'hordenn, oc'h ober tro an arc'h ha stignet a-dreuz ar skoaz, e c'hall c'hwec'h gwaz pignat evel-se betek kribenn ar menez ; bec'h warno, anat eo, rak divalav eo ar wenodenn. Poulladoù gwad a chomas war leur an iliz, beradennoù penn-da-benn an hent ; ur gwaz en em lakaas dindan an arched, e oa ruz-du e roched.

meurzh 28 genver 1975 - Emaon o paouez distreiñ eus ur gennva, n'am boa ket gweladennet betek-hen : MARAVILLAS ("Burzhodus") e anv. Em faltazi, e soñje din edo lec'hiet an tachad-se, war lein ur menez, evel ur gomezenn bennak. Ha padal e kejis gant un toull, ennañ ur guchenn lochoù strewet amañ-hag-ahont. Lakaet em boa em penn ober va zroidad, en hevelep devezh. Met pemp eur bale a yeas ganimp evit erruout hag ouzhpenn, va blenier yaouank, Viktor, a felle dezhañ edafen da leinañ d'e di. Dav din diskenn betek ar froud, krapañ start davet e atant, n'em boa mui na nerzh nag amzer da zistreiñ d'ar gêr. En em c'houlenn a ranker perak e kendalc'hont da sevel tiez ken bihan pa ne ra diouer dezho nag ar pri, nag ar vein, nag ar foenn. Lec'h zo evit un daolig, gwele an tad hag ar vamm, ur yar gant he foñsined er penn anezhañ, gwele ar mab nevez kavet gantañ ur plac'hig a 17 vloaz, hag a-us

da hini ar mab all, dizemez betek-hen. O c'hronnañ  
lochenn, parker nevez graet, gant maiz, youka mesk  
ha-mesk. Lorc'h a oa e Viktor o tiskouez din e blan-  
tennoù kafe yaouank ; merzhet en deus e tispakont da  
ha brokus, e skeud deliadur ur wezenn, "pakay" hec'h  
anv. Setu un tiegezh chomet berr gant o c'hafe kenta  
gortozet ganto seizh vloaz ha disec'het ar plant. Ma  
rankas an tad mont d'ar menezioù da glask ezañs.

A-boan erruet, e tegouezhas daou amezog e  
fistilhañ ganin : ur paotr yaouank hag ur gwaz dezha  
teir gwreg. Dezh o ivez e oa roet o fladad, o daou  
bladad soubenn. Hir amzer a oa c'hoazh da varvailhat  
betek an noz. Viktor a laka etre va daourn ur bibl,  
digoret al levr war al Lizher kentañ d'ar Gorintidi,  
pennad 7 e-lec'h ma komz Paol eus ar briedelezh. Se  
a oa evit kemenn din reiñ kentel d'an den lieswreg  
evel ma c'houlennas diganin ober prezegenn d'e dad  
gwall droet war an alkool. Dianav din an dachenn, ne  
gredis ket dispac'hañ an teil ; paotr an teir maouez  
a felle dezhañ gwintañ ur groaz war unan eus ar c'ha-  
nioù. Gwelloc'h, a aliis, sankañ anezhi er galon.

Setu avat, un tiegezh aymara gwall zisrann  
Ar re gozh a chom stag ouzh o henrelijion. "Va zad",  
eme Viktor, " n'en deus relijion ebet. E deroù ar bl  
hag e penn kentañ miz eost, em eus e welet o kinnig  
ezañs ha koka d'an Douar ha da Varr ar menezioù ha n  
tra ouzhpenn... E bedennoù a zeu eus e empenn nemet-  
ken." Ar mab-henañ, Viktor, ne vez mui war-dro ar ch  
pel azvendour ; hemañ o klask e hent pe o tisterniañ  
diouzh pep feiz. Idelfonso, er c'hontrol, ar mab yaou  
ankañ, ugent vloaz dezhañ, zo ur feizad, daoust dezha  
da anzav ouzhin ez eus diskredoni o tont dezhañ, abar  
ur pennad. "Micherour lik" eo bet anvet ha gant taol  
ennoù ar Skol Sabadek eo aet nevez'zo d'ober ur c'ha-  
gad avieladur. "Lavaret em eus d'an dud", emezañ,

kredin e Doue, soñjal en o silvidigezh, rak dizale e  
tistroio ar C'hrist..."

Eus ar gwellañ, e vez graet, d'an "hini gwenn"  
war koad ha foennar pezh a anver gwele, e oa ledet din  
daou sac'h rous, pallennoù hag etrezo, e-giz liñseloù,  
seier bleud digoret. Abred diouzh ar mintin, e oa prest  
an dijuniñ : un tasad dour diwar geotenn Loeiza ha ban-  
anez glas poazhet ha graet an neuz d'o zremen dre un  
tammig eoul pe zruzoni. Ha yao en hent gant Viktor !un  
eur, ya, un eur, evit sevel eus ar froud betek ar weno-  
denn. Pell a oa n'am boa ket graet ur seurt krogad !Va  
c'hredit, pa vez kousket fall evel-se, pa vezer skuizh-  
marv, e vez mall erruout er gêr. War glask eus e azen  
edo Viktor ; setu avat ul loen n'eus ket e frejoù gantañ ;  
bep sizhun, ur grabanad holen nemetken.

merc'her 5 c'hwevrer 1975 - Gouzout a ra c'hoazh an  
dud ez eo goulennet kofez, e-pad ar Sizhun-Santel.  
Emañ atav ar c'hiz da gemmañ dilhad goude an absolvern.  
E gouel en em wisker evit kenunvaniañ, rak n'eo ket  
mat henn ober gant ar gwiskamant a zo bet hini ar pec'-  
hed.

Dalc'hmat ivez e kred an dud eo ul louzaou-  
enn skourroù Sul ar Bleunioù. Bervet e vez dour diwar-  
no ha diwallet e vezont evit bezañ miret diouzh an  
droug. Darn all a soñj dezho ez eo an devezh-se gouel  
an azen, ha n'ouzont ket petore liamm a zo etre al  
loen-se hag ar C'hrist.

D'ar Yaou-Gamblid, e-pad an noz, ez eont d'an  
iliz, gant skourjezoù, evit "ober pinijenn". Da Wener-  
ar-Groaz, e vez roet ar skourjez d'ar vugale hag a-we-  
choù d'ar merc'hed. Ar c'hiz a zo c'hoazh da vont war  
ar maez da glask geot ha spern, dezho stumm ur groaz ;  
unan d'ober tizan pe da veilhañ an Aotrou, egile evit  
istribilhañ ouzh an nor, da ziwall an ti.

(gizioù a-ziwar dro Kuzko 1973)

gwener 7 c'hwevrer 1975 - Reuz ha freuzh zo bet, sishun-mañ, e Lima. Bec'h zo savet etre al Lu hag ar Archerion ("Guardia Civil") ha tud 'zo, reoù eus an kleiz-pellañ ha reoù eus ar gostezenn APRA, o deus e em vataet eus ar bec'h kouezhet war ar gouarnamant, evit deviñ, dismantriñ, lazhañ, dre greizkêr. Feuls bet dilamm ar Junta Militar : tro er c'hirri-arsailh tud lazhet zo bet, ur c'hant bennak, en deus lavaret din, hiziv, va skingomz, mard eo bet klevet mat gani oude seizh vloaz hanter a renerezh, setu Tud-al-Lu o kaout, evit ar wech kentañ, avel a-benn. Perak ? Diaes eo gouzout. Setu ur gouarnamant hanter demokratel hag hanter-actrouniezhus, o seblantout reiñ lañs d'ur sokialouriezh denel. Marteze n'o deus ket dalc'h het kont a-walc'h eus braster ar vro, eus diwarlerc'hded ar yoc'hoù, eus an diouer a zarevder, sternioù onest. Anat eo : pezh a zo eus an tu kleiz, war ar c'hevandir-mañ, en deus bec'h o chom en e sav Marteze Velasco hag e genseurte o deus graet an hevelep fazioù hag Allende. Amañ, avat, war ribloù ar stêr Tambopata, ar vuhez a red e-kreiz un diouiziegezh peoc'hus. Gant ma vo diskennet bemdez un dra bennak, e-barzh ar c'horf !

sul 9 c'hwevrer 1975 - Marvet eo babig ar vamm tremenet ouzh e lakaat er bed. Hag evit ober diouzh ar c'hiz, eo bet douaret dindan an noz. N'ouzon ket c'hoazh mat ar perag. Digarez din, hiziv, e-kerz an oferenñ da "folliñ" un tammig. Penaos kas d'ar vered e teñvalijenn an noz, ur badeziad, hag a zo "mab ar sklerijenn" ?

-Goude ar marv, e vez startet gant ul las gouzoug an den pe ar vaouez, evit mirout na zislonkfe loustoni. Goude avat, a-raok diskenn an arched

e-barzh an toull, e vez lamet ar gordennig. Perak ? O klask emañ : unan a lavar n'eo ket dereat al las ; un all a soñj ne c'hallfe ket dasorc'hiñ, krouget evel-se. Met perak gortoz evel-se an noz du a-raok sebeliañ ur bugel ? "Ar re vihan", eme Damian, n'o deus ket bevet ha n'o deus ket bet amzer d'en em voazañ ouzh an heol. Ha setu perak, pa vez o skeiñ a holl e nerzh, ne c'haller ket kas korfoù babiged d'ar vered". D'am meno, e tlefe bezañ displegadurioù all.

meurzh 11 c'hwevrer 1975 - An Ened zo ; ar "carnaval" amañ, met n'ouzon mui ar perag eus an dra. Un druez eo o gwelout o istribilhañ garlantezioù paper truilhek ouzh talbenn o ziez, o stlepel seizennoù a bep liv war an toennoù foenn. Dec'h da noz, o deus difoupet sone- rion ha korollerion ; ur guchennadig nemetken. N'em boa ket c'hoazh gwelet mammoù o tañsal gant o babig war o c'hein, ur penn maiz e pep dorn. Mezv 'oa ar wa- zed a-raok stagañ. Ya, un druez eo sellout ouzh tud oc'h ober bec'h da ober gouel ha n'ouzon ket an abeg. Evel merien gwenodennoù ar menezioù amañ, pep hini gant ur vruzhun delienn, gant ur vruzhun bleunienn, ur prosesion anezho, o vont, o vont, mall warno, dall, bouzar ha mut e-sell ouzh ar pal. Ar Feiz en deus dega- set amañ ar C'horaiz. Marv ar C'horaiz a-bell 'zo, deuet Meurlarjez da vezañ un euzhvil : ur sishunvez e pad amañ. Troet eo an den pec'her da greskiñ un draig evit mougañ an dra. Gant skoazell an diaoul, paotr ar sutigoù, paotr ar vrizharc'hadourezh.

sadorn 15 c'hwevrer 1975 - Abaoe dilun da noz, em eur krog eta gant an Ened : pemp dervesh leun. Adal ar merc'her betek ar sul da noz, n'eus ehan ebet, noz-deiz Ar ger "kiañ" zo dispar evit displegañ ur seurt gouel, koroll, alkool ! Alkool, koroll... ha tro... ha tro...!



Taboulin ha "kena" (fleüt an Andoù), diskan ha youc dennoù...diehan. Gwechall e Breizh, e veze dervezhi bras war ar maez. Amañ, ez eus dervezhioù bras Meur jez. Hep gouzout dezho, e klaskont tizhout ur mezva dre ar c'horoll, dre an "hini kreñv", dre ar skuizh. Ur youl dibleg ivez da genderc'hel da ober pezh a z bet graet betek-henn. Kiriloz a lavare din dec'h so ar re goz : "An dud", emezañ, a lavar ez eo ret se ar c'hiz, rak anez se, ez aio an amzer da fall, e koazho an eostoù..."

sul 23 c'hwevrer 1975 - Disul edo sul-klosañ an Ha setu a-greiz-holl, unan eus an archerion da c'her hiniennoù eus ar re yaouank deuet dezho an oad da vo d'ober o servij. Darn roet keloù dezho o deus sachet skasoù ganto, evel ma 'z int boaz da ober pa sav ar bec'h-se warno. Ar re tapet krog enno zo dastumet el lec'h a reer anezhañ an toull-bac'h." Urzh a ro an a cher dezho da lemel o roched da dav dei da ober lamm ranig, kant hanter-kant gwech. Hataolioù-dorn d'ar re chom berr. Ha kelornioù dour lous a-dreuz o c'horfoù gleb-teil gant ar c'hwezenn. "Douar", emezañ, " a vo sanket e genoù ar re a nac'h komz". War ar marc'had, ul luc'hskeudenn eus ar strollad, a-dal hag a-gostez Gant an urzh d'en em gaout dirazañ da 5 eur, "anez d se e vo boledoù en ho kroc'hen." Termaji e vefe ma n vefe ket bouevierezh. Komz a ran gant ar maer. "Ma" emezañ, " se eo doareoù feuls al lu... " Anat eo ema ar bouevierezh oc'h ober e reuz e pep lec'h ; deske e vez da holl baotred an "urzh" penaos ober aon d'an den, e lakaat e stad da blegañ e benn, disteraat e gorf evit gwanaat e ene. Hiniennoù eus ar yaouankizo se o deus gouezet avat e oad aet re bell ganto.

yaou 4 ebrel 1975 - Emaon o paouez distreiñ eus penn pellañ ar barrez. Chañs am eus bet, d'an distro, da bignat en ur c'harr-samm. Ha koulskoude pe vezer e-barzh, e vez keuz, ken garv ha mard eo an doare-se da veajiñ. Harpet gant netra, ar rod-eskemm a ruilhe hag a ziruilhe o stekiñ va c'hostennoù. Ha n'eo ket allaz-igoù a zo gant an estell, pa vransell korf ar c'harr, oc'h en em deurel hag oc'h en em zisteurel e toulloù don an hent. Ne c'hallan ket meizañ penaos an dud a seblant bourrañ kement o veajiñ, pa vez ken tenn pep krogad. Arabat kaout aon komz eus kalvar : ken rust eo ar c'hirri-samm ha gweleoù pleñch an Amerindianed. Hag ouzhpenn-se : an noz, ar yenijenn, ar c'hwezioù, gouelvan ar vugale, an enoe, an disac'h a droc'h an hent...

- Soñjal a ra d'Alan Stivell bezañ mouezh ganus kement bihanniver kenel a zo er bed. Kement pobl dezhi he yezh hag he stuzegezh (gw : LA VIE CATHOLIQUE niv. 1533 genver 1975). Neuze 'ta, Ketchouaed hag Aymaraed divouezh an Andoù o deus ur vouezh, bremañ, du-hont e Breizh. Pa lavar Alan Kocheveloù d'ar Vrezhoned morgousket :

Mar c'hellit ket "sell", dre ho taoulagad,  
mar c'hellit ket lar dezhi "da garan",  
mar c'hellit ket lar "va mab" d'ho pugel,  
echu an abadenn da virviken.

e lavar d'ar C'hetechouaed ( n'anavezan mann eus yezh an Aymaraed ) :

Mar c'hellit ket "qaway" dre ho taoulagad,  
mar c'hellit ket lar dezhi "munayki",  
mar c'hellit ket lar "churiy" d'ho pugel,  
echu an abadenn da virviken.

Da virviken ez a da vezañ dall,  
Un dachenn gwell d'ar Gwirvoud, d'an Holl  
Un tamm muioc'h mac'homet an denelezh  
Gant an nerzh, an arc'hant, an danvez.

Gwener 18 ebrel 1975 - A vloaz da vloaz eo anat e  
krog an Amerindianed gant un emsav, gant un dihunad  
Tri darvoud zo da lakaat war wel.

Manifesto Tiwanakou. Komzet em eus endev  
anezhañ en un niverenn eus IMBOURC'H. Tarzhet en deus  
e 1973, e-touezh Ketchouaed hag Aymaread Bolivia. Di  
kuliañ a ra korvoerezh ar Re-Wenn ha kounaat talvoud  
gezhioù ar stuzegezh amerindianat.

2. Kendalc'h San Bernardino e Paraguay. Da  
zileuriad ha tregont o tont eus unnek "broad INDIGEN  
o deus kejet eno adal an 8 d'ar 14 a viz here 1974. I  
e oa anezho Makiritared, Ketchouaed, Aymaraed, Gwan  
nied, Chouloupied, Tobaed, Kooaed, Mapouched, Paitav  
teraed, Pariksied, Matakased o tont eus pemp Stad:  
Arc'hantina, Bolivia, Brazil, Paraguay, Venezouela.  
Breutadeg zo bet ganto a-zivout o c'hudennoù dezho,  
gwarani, chulupi, spagnoleg ha portugaleg. N'eo bet  
aotreet den gwenn ebet da berzhiañ en divizoù. Paero  
niet eo bet avat ar gejadenn gant Kenseurtiezh "Indi  
genista" Paraguay, Kreizenn ar Studioù tudoniezhel e  
Skol-Veur Gatolik Paraguay, Ensavadur Etremerikat a  
Stourm enep ar Ouennelouriezh, Breuriezh broadel In  
dian Kanada ha Kuzul Ekumenek an Ilizoù.

3. Kendalc'h Amerindian San Cristobal de la  
Casas e Mec'hiko. Galvet eo bet gant Samuel Ruiz  
Garcia, eskob Chiapas dileuridi eus holl veuriadoù ar  
Stad : 1500 zo deuet, anezho Tzeltaled, Tzotziled,  
Choled, Toc'holabaled. Pouezet eo bet war ar mac'ho  
merezhezh diwasket ganto : douaroù laeret, diorroadur

dilezet, korvoadur kenwerzhel hag all. War zigarez  
Pempve Kantved Bertele Las Casas eo bet savet ur  
seurt kendalc'h ha bez e c'halled lenn kement-mañ  
war gazetennoù bras Mec'hiko : "Ar wech kentañ abaoe  
400 vloaz, m'eo bet klevet mouezh an Ameridian". Sed  
aze keleier laouen, evidomp-ni, Brezhoned. Keleier  
laouen ivez evit ar feizidi. Ret e vefe avat gwelout  
a-dost, rak n'eus ket kalz ha ne vefent ket a-du gant  
un erfeuzadur (1) pell pe dost.

(1)"enbarzhadur=integration."

Sadorn 19 ebrel 1975 - 500 000 ezel en deus tizhet  
an A.I.M. (Luskad Indian Amerikan), diazezet gant  
Clyde Bellecourt. Hemañ en deus goulennet groñs digant  
Kuzul Ekumenek an Ilizoù lavarout e soñj diwar-benn  
gouennlath (1) holleget Indianed Norzh-Amerika, dindan  
boan a welout an Ilizoù-se skarzhet kuit eus ar mira  
doù. Rak, hervezañ, "e vrudont ur ouennelouriezh kabestr  
ebet dezhi." Ouzhpenn-se, er Wisconsin, a eus bet alou  
bet ur manati katolik gant un daou-ugent Indian. Gou  
lenn a reont ma vefe graet un ospital gant ar gouent  
lec'hiet war o glad. Perc'henned kentañ ar c'hevandir  
mañ ne fell ket dezho mervel. Piv'ta a rebecho outo  
bezañ a-du gant ar vuhez ? N'eo ket avat ar Gwir Doue.  
Doue ar Vuhez, neketa ?

(1)"ethnocide."

Gwener 25 ebrel 1975 - Kavet ganin dimeurzh Lusiano  
war an hent. Hag eo dilammet da bokat din. Gwir eo,  
c'hwec'h vloaz zo, e skol kentañ derez Yanawaya, am  
boa klasket reiñ dezhañ un tammig harp, emzivad maz  
eo. Hag e stag da gontañ din penaos en deus desket ar  
vicher blenier karr-samm e-pad e amzer-servij. Ret eo  
dezhañ avat kemmñ e skrid-testeni roet dezhañ gant  
al lu en un aotre-bleniañ evit ar vuhez nannsoudard.

Pebezh torr-penn evelato ; dav eo dezhañ berniañ war-dro 500 lur evit sevel ar paperioù goulennet digantañ Hag emañ o kutuilh kafe : gant 0,50 lur bemdez, ne savo ket **buan** ar bern !

- Tri bloaz zo n'en doa ket C'hustino en em ziskouezet er gêr. Fidamdoue, n'em befe ket e anavezet ! Un amerindian troet da baotr yaouank etrevroadel : blev hir, roched marellet, bragez treid olifant tro-zorn. Ha kastilhaneg Lima leizh ar genoù. Ya, un dra bennak heñvel ouzh ur Justin brezhon o tont da hañviñ da Boulloù-Pri, un nebeut bloavezhioù 'zo.

- Oc'h erruout e Kuzko, e 1966, Rikardo Durand anvet da eskop, a soñje ennañ e-unan : " Daoust din bezañ Perouad, petra a anavezan-me eus an ene ketchouaek ? " Person oa e Lima.

Pastoral Andina Niv. 6 - 1975

Sadorn 26 ebrel 1975 - Ur c'houer yaouank paour-raz iliz eus trowardroioù lenn Titikaka, o vevañ gant 90 santim bemdez, youl dibleg dezhañ avat da zieubiñ e vreudeur, a gred skrivañ kement-mañ : " Ur spi am eus ", emezañ, "ed afemp, ni re Amerika Latinek, gant ar feiz a vo hon hini, davet ar C'hornog, evit skignañ Aviel reizhded an Aotrou... " Piv 'oar ? Marteze e komz ar Spered dre c'henoù ar C'heshwa-se.

Meurzh 6 mae 1975 - Ur skingaser eus Bolivia : LA CRUZ DEL SUR a roe da c'houzout, an deiz all, edo savet ur genstrivadeg evit gouel ar Mammoù : skrivañ ur varzhoneg en aymaraeg. Gwelloc'h eget netra marteze. Ur yezh a chom rez ar rimadell zo ur yezh barnet d'ar marv.

- Hep mank e selaouan bep abardaez, adal 6 eur da 7 eur 30, LA VOZ DE ALEMANIA (Mouezh Alamagn).

D'an 29 a viz ebrel, edo dirak ar mikro, ur c'helenner perouat, Ballon e anv, deuet da Bonn evit studiañ ar yezhouriezh. Hervezañ, e vefe c'hoazh 7 milion, dezho ar c'hetchouaeg da yezh. Gant ur milion hanter ez eus ur yezh c'hlan ; gant ar peurrest, ur veskailhez : ar c'hastilhaneg a c'hounez tachenn dalc'hmat, ar saozneg zoken, a ra e dammig.

Paz eo bet goulennet gantañ ha tu e oa da ober gant ar c'hetchouaeg ur benveg klok, n'eo ket bet fraezh en e gaoz. Anzavet en deus ne oa ket anv da skarzhañ kuit ar spagnoleg, hag e aspadfe c'hoazh ar yezh-se e-doug meur a vloavezh. "Al Levierzh Dispac'hus, emezañ da echuiñ, a glask bremañ mirout hevelebiezh ar pobloù-se, daoust d'o yezhioù da goazhañ." Kelenner e Skol-Veur Sant Mark e Lima eo Ballon hag e teu gantañ seurt diotachou !

Lun 19 mae 1975 - Ur wech muic'h eo bet graet koun e Luaneg, e Landreger hag er Vinic'hi eus ar brezhon en em lezas da vezañ santelaet kement gant ar Spered. Moulet eo e anv war un deiziadur embannet gant Francezidi Lima ha deuet betek amañ, e spagnoleg avat : Ivon.

- Dec'h da abardaez, gouel ar Pantekost, on en em gavet gant un den kozh, ur vazh gantañ, hanter-seizet an hanter anezhañ, oc'h en em ruzañ betek ar gêr, div eur bale diouzh Yanawaya, gant sav penn-dabenn. Kastilhaneg dereat-tre gantañ ha kalz kaoz outañ, em eus e bedet da zont d'am gweladenniñ. Hag eo deuet, ar mintin-mañ.

N'em eus ket bet amzer a-walc'h da c'houlennata ar paotr 65 bloaz dezhañ, ganet eta e 1910. Setu amañ traoigoù klevet gantañ. "Va zad-kozh", emezañ, "en deus lavaret din bezañ bet anavezet ur gernez spontus, marteze war-dro 1870, met n'ouzon ket resis. Skorn tev ha padus a gasas da get kement hadenn'zo.

Parch a oa rostet da zebriñ. Tiegzhioù zo a fardas boued ganto bugale. Bec'h a oa etre an dud evit lakaat ar graban war irouezhennig ar c'heotenn dreut, "ichou" hec'h anv, a ziwan war an uhelgompezennoù.

"Gouzout a ran pegen euzhus eo bet ar Brezel-Bed kentañ, dre lenn kelaouennoù ha gwelout em yaouankiz filmoù diskouezet e Kuzko. E 1928, em eus soñj bezañ gwelet an tankirri kentañ oc'h erruout er vro : holl e oant CHEVROLET, ha ne goustent nemet 4 700 soles (470 lur)."

"O vezañ labouret, tri bloaz, er mengleuzioù aour, ec'h anavezan mat o ferc'henned. Tud ouez", emezañ, "darn anezho o deus gwerzhet tonennoù aour. Holl avat o deus echuet fall-tre, o foraniñ o danvez betek penn, gant an dud uhel. En em lakaet o deus a-grenn war ar sec'h. Evel pa vefe kouezhet warno mallozh Doue.

Sin a nacnegezh eo ur steredenn lostek evitañ.

Sadorn 31 mae 1975 - Unan eus trevioù ar barrez eo Aguada e anv. P'ho peus breset 9 c'hilometrad a wendenn ec'h erruit a-dal d'ur froud taolet warnañ pevar c'hef. Hag e chom ganeoc'h c'hoazh ur pennadig hent da ober a-hed an dour hag ar menez da grapañ, war e lein, ar skol, ti ar skolaer, daou pe tri di, ar chapel azvendour : ar c'hilometrad diwezhañ a raio deoc'h c'hweziñ ha c'hwezhañ. Ma, evit an eil gwech eo din d'en em goll e-kreiz an deiz, ma n'eo ket un druez-diouzhtu goude ar pontig. Skeiñ a ra war daou hentig ha div wech, e lakan va zreid en hini fall. Ur miz zo, e kavis un ti hag ur c'houer hegarat-tre, evit va bleniañ ha zoken va sammañ war e gein evit treuziñ ar froud, hep kaout ezhomm da dennañ va loeroù ha va botoù. Dimerc'her, goude troidellañ ha troidellañ,

e-pad ouzhpenn un eur, tu ebet, da welout an disterañ penn-kristen. Ober a rae ur glavig stank, heñvel ouzh ul lusen. Oc'h heuliañ gwenodennoù nann-darempredet ha chomet hep dic'harzhañ, buan ne oan mui nemet ur soubenn trempet-mat. Tro-dro din, ur sioulder ponner hep ur grik ; an atantoù zo ken pell an eil diouzh egile. Pa saven va fenn, pep tra, pep kern menez soubet en ur vodigell wenn ha tev. Un tamm anken a zeu deoc'h neuze hag e soñjit : kollet e-kreiz an deiz ha petra eo neuze bezañ kollet e-kreiz an noz ? Erfin, em eus diskoachet un ti ouzh un dorgenn a-dal hag unan bev bennak o fiñval er porzh. Un tad-kozh an hini e oa. Komz gant e deod ha diskouez gant e vrec'h n'eo ket bet a-walc'h evidon ; dre c'hañs e kejis gant un hent darempredet am c'hasas adarre betek ar pontig strobiniellus. Klevet em eus ar re gozh o kontañ ed int bet kilhet. Lavaret e c'hallfen-me ivez ez on bet kilhet div wech e Aguada. Nann, dievezh nemetken ha ne vin ket paket mui ; ur bir am eus treset stok ar pontig hudek. (ur bir →)

"Anavezout a ran un itron, renket ganti he faperioù, hag he deus ranket mont betek dek gwech da vurevioù ar Gedskor, evit dont a-benn da vezañ oberataet, dindan dek munutenn nemetken, e ti ar mezeg. Anavezout a ran reoù all aet da Lima evit ma vefe graet war o zro (n'oa ket tu d'henn ober e Sikouani-140 km eus Kuzko-) hag e oa lavaret dezho e oa dav dezho gortoz tri miz."

- E Perou, emeur eta da vat o seveniñ Adaos ar Glad. Deuet eo ar gourfec'hennerezhioù (an "hacienda-ou") da vezañ kevelourioù. Siwazh ! N'eus graet nemet kemmañ frammadurioù. Kent, ar paourkaezh kouerion a gie evit ur pezh tamm ozhac'h-meur, unan hepken.

Bremañ ed a an tamm gwellañ gant pevar ijinour ha nouspet kenskoazellerez (assistante sociale). E Ayaviri ez eus bremañ un dominigad mesaer a vicher. Deuet eo a-benn da lakaat e fri e paperioù unan eus ar c'hevelourioù-se. War 3 milion a vuzad, 2 a ya da c'hoprañ ar gargidi. Nann, n'eo ket a-walc'h kemañ ar frammoù !

Gwener 11 mezheven 1975 - Pa c'houlennan digant beleion o vevañ war an uhelgompezennoù petra soñjont eus Adaoz ar Glad, eus an "Dispac'h", ne soñjont nemet droug. Diskleriañ a reont n'eo nemet ur fals dispac'h. Evelato an holl ne welont ket an traoù e-giz-se ; da skouer, Jil Bertin e "CONNAISSANCE DES JEUNES NATIONS" Meurzh 1975. Ar gouerion, emezañ, m'omp degouezhet ganto, a seblant, dre vras, kaout o gwalc'h gant ar pezh int deuet a-benn da gaout : gwellaenn zo gant o goprou, ha dreist-holl, evel ma lavare unan anzho " bremañ mistri nevez ar c'hevelourioù o deus doujañs evidomp ha n'hon eus mui mezh ebet o vezañ indian".

Asur eo e tremen bremañ un tamm muioc'h a arc'hant dre zaouarn al labourerion-douar. Evelato n'eo c'hoazh nemet ur pezh paourentez e-kicher ar binvidigezh dichek a chom c'hoazh gant lod eus ar re a zo bet "pennoù-bras" Perou, bepred o chom e karterioù cheuc'h LIMA, Miraflores, San Isidro o anv. Darn eus ar "familhoù bras-se" a oa perc'henn war draoniennoù dezho kantadoù a gilometroù, gant tri seurt temz-amzer ma oa tu da gaout gounezadurioù liesdoare. C'hwen zo bremañ en o loeroù rak broadelet eo tamm-ha-tamm ar gennvaou bras armerzhel. Gwelout a reont o banieloù o kouezhañ en dour ha gwanet int

bremañ evit ur binvidigezh re vras, ha meur a gantved a aotrouniezh divergont.

Jun 30 mezheven 1975 - E 1967, a gredan, on bet stag et amañ da ober gant ur marc'h-houarn, peurechuet an hent bras betek San Juan del Oro. Adarre e tistroan d'ar c'harr-se, goude bezañ soñjet en ur mul, en ur marc'h-bihan. Nevez eo ar benveg ha fardet e Perou. Ar priz : 400 lur. Eizhtez 'zo eta, em eus graet gantañ va beaj kentañ. Muioc'h amzer avat am eus tremenet en e gichen eget a-ramp warnañ. Krapit war droad, teir eur-pad; goude 'po ar blijadur da azezañ ha da lezel ar rodoù da dreiñ. Dalc'hit mat evelato ho taouarnwar ar starderezed, rak dibaot eo ar pennadoù-hent didoull ha divouilhenn hag it evel-se war-draoñ e-pad un eur. D'an distro, heñvel : puntit ar marc'h e-pad teir eur all, kit warnañ paz eus tammoù kompez ha tizhet ganeoc'h 1920 metrad hep bec'h ebet, diskennit betek 1300. Hep bec'h ebet... n'eo ket gwir-tre, rak ho pizied a vo skuizh-marv o stardañ hag ho taoulagad a ranko parañ dalc'hmat war an hent.

Dre amañ, eo evit c'hoazh rouez-kenañ ar mirc'hed-houarn, rak ne c'hallont ket servijañ da galz a dra : etre Yanawa ha San Juan del Oro hepken, da lavarout eo war 8 kilometrad hent. N'eus ket evit c'hoazh rolloù da baeañ evito ; n'eo ket ret dezho dougen ar blakenn niverennet.

Meurzh 8 gouhere 1975 - Ur c'heloù mat evit ar Bobl ketchouaek : savet eo he yezh da renk ur yezh kefridiel abaoe ur 7 a viz mezheven. Ur c'heloù mat ivez evit Breizh, rak bep tro pa vez enoret ur yezh ur bobl, sellet evel bihan, dre ar bed, e strink ur bann-heol nevez war Vreizh. D'ar 24 a viz Mezheven,

a lennan e CORREO Arrequya, evit ar wech kentañ, eo bet kanet ar c'han broadel e ketchouaeg e departamant Puno, gant bugale ur skol kentañ derez a zivar ar maez

Meurzh 15 gouhere 1975 - Amañ n'eus gouel a-zoare ebet hep korfad. Ha korfad betek tarz-h-deiz ; ne vefe ket dereat deoc'h chom a-sav a-raok. Disul e oa un abadenn mell-droad e San Juan ha strollad ar gêriadenn mañ e-lec'h ma vevan bremañ, ar c'halz eus va amzer, a gollas. Hep koll avat ar gwir da lonkañ bier penna-da-benn un nozhvezh... hag ouzhpenn, rak cholori diot a oa c'hoazh en ostaliri, betek kreisteiz. En tu all d'ar straed, a-dal d'am c'hamb, emañ an toull pike-vez-se. Skolidi ha skolaerion o ribotañ a-gevret, en anv ar sport. Dre vras, sport hag alkool a gerzh kazel ha kazel, dre ar bed. Sport hag arc'hant, startoc'h dimezet c'hoazh, ur vezh ruz. Ar sport, er broioù diwarlec'hiet, ur sutig da lakaat an dud chom hep soñjal en o dienez. Kement a nerzhioù plantet evit dispac'hañ kement a avel! Ar sport, ur c'hozh tra, ne rofen ket evitañ ur gwenneg toull. Un idolenn evit milionoù a dud, un idolenn c'hwez-higell, n'eus muzul ebet d'an aberzhioù denel goulennet ganti.

Sul 10 eost 1975 - Tennet eo bet ar wask digant he ferc'henned. Kazetennoù bras Lima evel La Prensa, EL COMERCIO, EL CORREO, e dalc'h ur guchennad familhoù, zo bet roet d'ar vicherourion, d'ar gouerion, d'al labourerion. Ur greizenn zo a glask bezañ kreñv eo ar skol. An deiz all, er presbital, e oa un emvod evit dilenn dileuridi karget da votiñ evit reoù all, hag evel-se, eus San Juan del Oro betek kêrbenn ar Stad en ur bignat gant ar skeul, evit lakaat ar gaze-tenn EL COMERCIO etre daouarn ar skolaerion hag ar gelenourion.

Huchal a c'haller ez eus aze un dorridigezh eus frankiz ar wask. Ha koulskoude pa soñjer ervat, an toulladig familhoù-se eus an tu dehoù ne oant mouezh nemet un darnig eus ar boblañs. Ouzhpenn-se, e-diabarzh un argerzh dispac'hel, eo ret kaout binvioù-kelaouiñ diskouezus ma c'hallfe ar bobl perouat bezañ klevet ganto.

- Pa ne welan ket en iliz ur penn gwelet ganin disul diwezhañ pe ur sul all, ez on diseblant, dinec'h, o soñjal : " Ma, frankiz an den eo...!" Pezh a c'hoarvez 85% gwech. Dilaoen on avat, pa veizan : " Met an Doue-Mat n'eo ket karet...!"

Lun 11 eost 1975 - En Edern, e-kichen Brieg, ez eus un maner, an tiegezh Hallier perc'henn anezhañ. Eus ar gaoued bourc'hiz-se en deus diflipet avat un iskis a labous, ruz-tan e bluñv : mab an ti, Yann-Edern e anv. Eus an tu-kleiz-pellañ e oa ar paotr ha gantañ edo ar stur eus ar gelaouenn L'IDIOT INTERNATIONAL. Dastumet ez eus bet, e Bro-c'hall, un tamm arc'hant evit Chiliz : 100 000 lur bennak. En em ginig a reas ar skrivagner, evit dougen ar yalc'had ha lodennañ anezhi. En e c'hodell, 370 000 lur evit Frejoù ar veaj : 37 milion kozh, n'eo ket divalav ! Petra zo c'hoarvezet ? Doñjeret-groñs eo bet an dispac'her" gant emzalc'h ar chiliad gwasket gant Pinochet : dirazañ ne oa nemet azgoulennerion ha torchoù-listri. War-c'hed edo eus aeled, a-berzh tud nac'homet gant ar gwalleur. Prenet en deus neuze 400 000 kantar e kalon Amazonia. Troet en deus kein d'e chupenn mouk ha skrivet en deus ul levr all : CHAGRIN D'AMOUR, un oberenn lourennek, dispont, gal-loudus, hervez Zavier Grall. E zelwenn dezhañ e-unan emañ paotr Edern o kizellañ ha diwar-goust petra !

Merc'her 13 eost 1975 - Unan eus barzhed brudetañ Perou eo Kaezar Vallejo. Un deiz e c'houlennas hemañ digant e baeron : "Petra eo Perou ?" Hag o tiskouez deshañ un douger-sammoù, ur pezh bec'h war e ziskoaz, o tremen dirak an ti. "Se eo, mabig, se eo Perou, an indianed karget ken ma'z int ha dezho kalz a naon."

Sul 17 eost 1975 - Ankounac'haet em eus kontañ ur veaj da Ayaviri n'emaon ket war-nes disoñjal koulskoude. Soñjit 'ta, pemp devezh gouestlet d'ar veaj evit en em vataat eus un devezh emvod. Ha c'hoazh a-boan m'hon eus bet un tañva.

Kalon dir ar c'harrig-samm japanat a yeas brav en-dro, betek peder eur bennak diouzh an abardaez. Ha setu a-daol krenn, difiñv pep tra. Ha n'eo tamm ebet ur sac'hadenn ordinal. Va daou genseil a blant o fri hag o bizied e troidelloù ar c'heflusker, a viñs hag a ziviñs dindan ha war-c'horre. Me avat, diouziek-poch war bep tra, zo kentoc'h war an hent ; ne dalvezan ket ur c'hwibuenn war fri ur marc'h limon. Seul-vui ma riskl an heol, seul-vui eo dantet don ho kig gant un avel o tiniñjal a-ziwar erc'h ar pellderioù meneziek. Amañ, war ar gompezenn diharz, skoilh ebet dezhañ nemet an "ichou", ar c'heotenn treut-gagn-se, n'he deus poan ebet o stouiñ dezhi he fenn. Ti ebet a-dost. Den ebet, karr ebet o tremen. Ret eo an zav ne vez hini ebet sonn e glipenn. Petore nozvezh e vo an hini a zeu ? Penaos dont a-benn d'en em sachañ er-maez eus ul lec'h ken mantrus ? Ur wech diviet pep goanag da zegas adarre buhez er c'heflusker, setu m'eo ret divizout. Maoris a chomo er c'harr, ha ni hon-daou, Frañsez ha me, a valeo keit ha ma vo ret henn ober. Mall eo ganin fiñval, rak abaoe div eur 'zo, n'on mui nemet un tamm skorn ; arabat disoñjal e pignan eus ur vro dianav dezhi ar yenijenn, m'on

chomet enni nav miz diouzh renk. Dre chañs ez eus loar anezhi ; an hent meinek-tre avat a ra dimp kerzhout, un tammig, evel daou soner o tont d'ar gêr eus ur festnoz. Bep an amzer, pa dremenomp dirak un ti pe ur c'henkiz, e lamm warnomp ar chas, unan, daou, tri alies Mein a stardomp en hon daouarn bep tro, met n'hon eus ket ezhomm da ober ganto. Soñjal a rae da Frañsez bezañ pell diouzh Crucero ar gêrig tostañ ; e gwirionez goude teir bale bennak, ec'h errujomp. Gant an archerdi ne oa digor nemet un ostaliri. Ouzh taol gant daou all, ar maer, dezhañ ur CHEVROLET nevez, a-sav war ar straed Ne fellas ket dezhañ mont da stlejañ hor c'harrig-samm. Un archer avat en em zirenkas da ziskouez dimp tiez mekanikerion. Hini ebet ne falvezas ganto sevel eus o gwele. Petra ober? Distreiñ d'an ostaliri da zebrif un tamm koan klouar ha mont da glask un toull da gouskat. N'eo ket brav mont-tre en ur c'hozh ti, tud o roc'hal e gweleoù, hag hep gouloù, tastornañ evit gwelout pelec'h e vo tu da astenn ar c'horf. Tu ebet da zegas tomm d'am zreid, ne serris ket ul lagad. A-raok tarzheiz edomp war-sav ha mall ganimp mont da zihunañ ar mekaniker. Er vro-mañ arabat avat kaout pres a re da werzhañ. Dav eo gedal pell ; amzer da skeif kalet an treid ouzh simant al leurgêr... en aner avat. Re dev ar skorn ha re wan heol ar beure. Amzer ivez da ober ur gwel d'an iliz. Kement hini en deus skrivet a-zivout ilizoù ha chapelioù Perou n'eo morse chomet hep diskleriañ doare al leur anezho. Bez e c'haller hep freuzañ ur c'hased, neketa ? Hag en em vataat eus e strad hag e bevar c'hostez. Ijinit eta ur plañchod iliz aet karrezennoù eus ar seurt-se d'henn ober, a-bezh. Ha war bep tamm koad koulz lavarout, e lennit: ALCOHOL del NORTE (alkool ar reter). War an uhelgompezennoù, n'eus ket liv eus ur wezenn, setu perak betek-henn ne oa ket ur begad koad etre daouarn an

dud-se... nemet hini ar c'hasedoù klozet enno ar voest houarn gwenn, lestr an "hini kreñv", meur a litrad anezhañ e pep hini. Ha peogwir d'ar gouelioù, ne veze ket damant d'an arc'hant evit en em vezviñ gant an alkool-se tennet eus ar c'horzh-sukr, e oa kasedoù a vil-vern. Ha setu kavet ul leur-zi d'ar santual. Ha kavet marteze ul liamm etre ar pec'hed hag e bardon. Pezh a zo anat eo n'eus ket a ouel hep mezventi. Ha relijiel hepken eo bet ar gouel betek-henn.

Ur gwall nozvezh eo bet hini Maoris : ur pezh gwiskad rev gwenn a zo war werenn ar c'harr. Stlejet-en betek ar vourc'h e vo turiet dezhañ adarre e gof gant ar mekaniker. N'eo ket hemañ dic'houest : en Arc'hantina en deus desket e vicher. Divizout a ra avat n'eus mann da ober : ne chom nemet un diskoulm, stiral betek Ayaviri. An taol : 200 lur ha c'hwec'h eur hent. Kriz spontus eo an heol ha ken tev ar boultren m'en deus unan bec'h o tialanañ. Bep an amzer e tiskrog pe e torr ar gordenn ha ret mont d'he soubañ e dour ur ster pe ur stankenn. Ouzhpenn-se, a vare da vare, e teu deoc'h ar blijadur da ruilhañ e-giz pa vefe war follennoù-houarn gwagennek. Gant ar c'hirr samm eo lakaet an hent evel-se met n'ouzon nag ar pera nag ar penaos. N'eo ket dav lavarout e oamp lazhet gant ar skuizh ha divarrek da gemerout perzh emvodoù. Se a oa da sul ha da lun.

D'ar merc'her da noz, e oa kempennet an tankarr. D'ar yaou vintin, e loc'homp war-dro 8 eur 30 bennak. Dispar ar veaj betek 3 eur diouzh an abardaez. Mont a reomp neuze war un hent divalav-tre davet ur gêriadenn digenvez-kenañ. A-daol trumm, ur strakadenn ; ne dro mui ar rodoù. Torret eo ur c'hrog ha kouezhet eo un tamm d'an douar. N'eo ket skañv an anken, rak ne dremen dre ar roud-se nemet ur c'harr-samm

ur wech ar sizhun hep-tra-ken.

Buan e tivizomp. Maoris a yelo war e giz davet an hent bras, da glask skor ur c'harr-samm. Frañsez a sko war-du ar gêriadenn tostañ da feurmiñ dougerion evit sammañ kuit ar sac'hadoù simant hag ar pakadoù boued. Me, a azezo, tamolodet, er gambr-stur... da ziwall ha da c'hortoz. Amzer da brederiañ, da bediñ, neketa ? Siwazh, nebeut-tre... Ur soñj hepken a gantre em c'hlopenn : penaos 'ta ec'h echuo an abadenn-mañ ? Da serr-noz avat, e tiplukas Frañsez, kavet gantañ pevar c'hkeohwabernak, muled d'o heul. Diskarget pep tra, pep unan ha pep loen a samm kement ha ma c'hell. Ha yao en hent ! Evel tud dall, rak an noz du zo deuet war ar menezioù garv.

A-boan graet ganimp un nebeut kammedoù, e hop dimp an dougerion : " Ur c'harr ! Ur c'harr !" Bec'h hon eus o krediñ ha koulskoude, du-se, en ode, war grec'henn an hent, e fiñv ur gouloù kreñv. Ma ! Maoris eo, ha gantañ blenier karr-samm an eskop. Tizhet gantañ an hent-bras, eo kouezhet dres warnañ. E-unan eo lezet bremañ ar c'harrig-samm tennet an dour diouzh e geflusker. Ha pep hini a ya diouzh e du. N'emaon ket c'hoazh en ur gwele. A-benn peder eur bennak nemetken, er gêr nesañ, Cuyo-Cuyo hec'h anv. Ha ne vo ket hep barradoù spont, rak e starderezh-dorn zo diefed alies.

D'ar gwener, mintin mat, e pignan en ur c'harr-samm all, a-benn erruout e Sandia, da lidañ gouel Sant Jakez, rak Maoris, ar person, eo ret dezhañ ober war-dro e garr, sac'het du-se war uhelderioù Patambouko. Ar gwener abardaez eo pa zisken-nan e San Juan del Oro, laouen evel unan dichapet eus an ifern, mall ruz ganin mont da astenn va c'horf.



Hag evidon amañ eo heñvel ouzh tremen eus ur forn gor d'un armell-yen. C'hwec'h devezh, ya, c'hwec'h devezh en deus padet ar veaj ; daou evit mont ha daou evit dont ! Dibunet hon eus 800 kilometrad bennak.

Gwener 4 gwengolo 1975 - An deiz all, e kejis gant ur paotr o vont d'ar skol. Gant e garned notennoù en e zorn. Amañ ivez e vez goulennet o soñj digant ar gerent : pezh zo didalvez-kaer evit an darn vuiañ . War an tamm kartofis-mañ avat, en doa skrivet an tad, kement-mañ : " Goulenn a reer ma ne vefe ket sevenet kermesoù gant alkool, diwar atiz ar gelennerion o-unan' "

- + Ur mousig a gerzh war-du SanJuan.
- D'ober petra ez ez e-giz-se ?
- Da brenañ alkool evit va zad kouezhet klañv.
- Penaos 'ta n'emaout ket d'an ampoent e-barzh ar skol?
- Nann, emañ o "tiskuizañ". Chom a ra ganin c'hoazh ur bloavezh da ober.
- Ha piv en deus lavaret dit ehanañ evel-se ?
- Va zad... Eñ a lavar e teu da vezañ laeron ar re a chom war ar studi... Ret eo labourat er park.

Betek-henn bugale ar gouerion a oa lent, douget d'al labour da heul o zud. Bremañ, diwar goust ar skol o deus hardishaet hag en em zigabestret eus o c'herent. Se n'eo ket gwelet gwall-gaer. Tamall a reont d'ar seurezed a zo amañ fardañ merc'hed savet fall.

+ Lenn a ran er gelaouenn MENSAGE IBEROAMERICAN meurzh 1975 : " Ret eo dimp derc'hel kont eus an hedro m'eo an den venezouelat." Amañ eo diskaret pep tra ha war bep tachenn gant an diouer a gendalc'husted. Gwelout a ran bremañ ez eo ur c'hleñved taget gantañ ar c'hevandir-mañ a-bezh.

Lun 15 gwengolo 1975 - Ar verc'h-kaer a zeu d'am c'hlask :

- Padre, va zad-kaer ne fell ket dezhañ mervel...

Ar beleg evel ar bistolenn-dro, ar binim, an 'helazherezh' ('euthanasia').

+ Bevañ a ran e-touez amerindianed diwriziennet, kemmet ganto o chomadur, war glask eus douaroù all. Ha gwelout a ran ar pezh maz int o horjellañ. En ur metou all, enframmet en un armerzh kenwerzhañ, (économie de marché), dilezet ganto an armerzh emvezeziñ (économie de subsistance), stummet gant ur skol e dalc'h mistri a fell dezho muioc'h-mui disteurel pep tra, ne gredan ket e vefe Indian " an hini a adroio dimp gwrizioù." Kement-se eo avat a soñj ar beleg Andreu Aubry : " An Indian, emezañ, en deus en em vataet eus e oreladur (marginalisation) evit goveliañ skouerioù stuzegezhel all ha mont a reont en-dro, empennadoù all eus ar garantez, ar marv, ar reizhder, ar yec'hed... Goude daou rummad el lastez kêrioù gall, ed a da netra ar Brezhon, er gourc'hêrioù gall. An Indian avat, pevar c'hantved goude an aloubadur spagnolek, gant e feulsterioù, goude mac'homerezh ar "sevenadur" a-berzh an hini-Gwenn, en deus savet skouerioù kulturel nevez, na gnglotont ket gant hor c'hevredigezh-ni." ( I.C.I. 15;6. 75)

Sadorn 27 gwengolo 1975- En hent evit Ayaviri ha graet hon eus un ehan e Sandia. Dedennet eo va evezh gant daou baotr o redek gant dornadoù douar du war-zu ur gwalc'hva. En ur mell plad koad, e tistremont al lag-se, en ur flastrañ ar poulloud gant o bizied. Tamm-ha-tamm, e vannont kuit, en ur ziwall mat da stlepel ar pezh a chom er strad. Ne greden ket ha koulskoude e stirlink dindan va daoulagad skanten-nigoù bihan-bihan. Aour...ya, aour. Ha pep taol eo

e giz-se. E straedoù ar vourc'h eo heñvel : goude ur barrad glav, eo a-walc'h daoublegañ evit kutuilh ar metal melen.

Gwener 7 du 1975 - 6 eur 30 diouzh an noz eo : ll eur noz e Breizh. Emaon o selaou, evel bemdeiz, MOUEZH ALAMAGN. Komz a reer, hiziv, eus ar yezh ketchouaek. Setu amañ, e berr, pezh a zo bet displeget. Pemp milion a dud a ra gant ar c'hetchouaeg, e Perou, Bolivia ha zoken en ul lodenn eus Arc'hentina. Amañ ez eus daou vilion n'ouzont nemet ar yezh-se. Miz ebrel a zeu, dre ret, e vo kelennet en holl skolioù hag evit harpañ seurt kelennadur, o deus ar Stadoù-Unanet, Kanada, Alamagn-ar-C'hornog kinniget skoazell. Da heul ar youl da silañ ur vuhez nevez er c'hetchouaeg e c'hallfe bezañ ivez ar c'hoant a emserradur, a estrengasoni, an amkan da vagañ ar vroadelouriezh. Arvaroù zo eta. Ur gread a reizhder eo evelato e-keñver ur boblad roet dezhi betek-hen tamm ar c'hi. En Europa ivez, ez eus ur bern kenelioù o stourm ouzh kreizennelouriezhioù gwashaet. Hag ar skingomzer da venegiñ Euzkadiz, Katalaniz, Prevañsiz ha Breizhiz. " Ar Vrezhoned", emezañ, " en em zifret en aner a-enep al levieriezh c'hall... Peurvarv eo ar c'herneveg ha koulskoude ar broioù keltiek, e krog bepred gant Bro-Saoz, e deus roet d'ar bed ul lennegezh veur. Hir ha spernek e vo ar c'hrogad evit ar c'hetchouaeg ha ret e vo, war an hevelep tro nerzhekaat kelennadur ar spagnoleg.

N'eus ket da chortoz gwelloc'h digant tud ar Stadoù bras. Keit ha ma kendalc'ho ar yezhoù pinvidik da binvidikaat e kendalc'ho ar yezhoù paour da baouraat. Boueta korf ken treut hag ur skoul ar c'hetchouaeg... ya! Met diwallomp, ra vo neuze leunchouk rastell korf lart-kuilh ar spagnoleg ! Arabat

goanagiñ eta. Ni hon-unan nemetken !

Sadorn 8 du 1975 - Ken doujet eo an VAMMDOUAR (Pachamma) ma ne vez ket staotet war an tachennoù hadet, graet lidoù war o zro.

- E Sikouani, kichenn Cusco, ul leanez a buch a-zioc'h ur wazh da walc'hiñ pe da c'lebiañ ur frilien. Gwelet eo gant kouerion, hag a hop dezhi : "Diwallit, C'hoar, dougerez e vefoc'h !" Un dra vev, eta, eo evito an dour, gallus da lakaat ar vuhez da strinkañ. Pep tra a zo dezhi un "ene".

Sadorn 15 du 1975 - Franco zo war e dremenvar e-pad ma saver da yezhoù kefridiel an euzkareg, ar c'hatalaneg, hag ar galisianeg ; setu keloù an noz-mañ. Keloù n'en deus ket stoket divskouarn ar "Sturrier", rak anez da-se, en defe roet dezhañ taol ar marv. Ma tiwan avat al lezenn nevez-se eus kalon ar galisian Franco, e vo diverret dezhañ e burgator. Setu yezhoù "rannvroel" lakaet e renk yezhoù "broadel". Goude ar mac'homerezh, al laeroñsi. N'eus ket bet morse a yezhoù rannvroel. Broadel eo an holl yezhoù. Ha Stad ebet n'en deus ar gwir da gemenn ez eo "broadel" hiviziken yezhoù ha n'int ket dezhañ e doare ebet. Mard eo an euzkareg yezh broadel Euzkadi ne c'hall ket bezañ yezh vroadel Spagnl !

Lun 17 du 1975 - Dacu lizher zo en em gavet betek ennon. Bec'h zo e Breizh... E Plougernev, e vev bremañ war e leve ur medisin, Per Ar Gall e anv. Un toullad bloavezhioù 'zo eo deuet d'ar brezhoneg ha n'eo ket hepken d'ar yezh, d'an Emsav avat. "Mantrus eo ar c'heleier," emezañ, " goude rannidi Le Douarec, Fréville, hag Estev, setu rannidi Pariz Debré kaset ivez d'an traoñ gant un taol plastik.

Hag eñ ha fuloriñ, eveljust, pezh a zo meizus a-walc'h memestra, goude e youc'hadennoù, setu Breizh skubet eus an eil penn d'egile gant archerion deuet eus a bep korn a Vro-C'hall... Amañ, em zi, n'eus bet furch ebet ha koulskoude n'on ket evit chaokaat va mennozhioù e kuzh. Nebeut 'zo c'hoazh, em eus skrivet da d-Zebré da lavarout dezhañ, krenn ha krak, ar pezh a soñjan diwar e benn ha n'em eus ket a geuz. Ur respont droch am eus bet digantañ. Gantañ, siwazh, emañ penn ar vazh. Ha bremañ, ken laosk, ken hegreidik, ken dizesk eo hor c'henvroidi maz eo ur vezh ! Peadra, a-wechoù, da stlepel an trebez goude ar billig ! N'eo ket o faot, her gouzout a ran ervat. "Arabab tamall d'an trevadennet pezh a zeu eus an trevadennet". a lavare Morvan Lebesque... ha koulskoude ! Diaes eo va fenn. N'on ket evit da skrivañ pelloc'h... Ar c'hazetennoù n'int ket eus ar re deodek. An "HOUAD CHADENNET" e-unan a chom mut !"

(24 a viz here 1975)

" Un dra a zo scuezhus : kavidigezh danvez-tarzh e ti Yann Fouere. D'e oad, goude ar vuhez politikel a zo bet e hini, ne gredan ket ne vefe ket deuet da vezañ un tammig louarn, gwidreüs a-walc'h da guzhat mat-tre un danvez ken arvarus. Bremañ, ma n'eo ket gantañ, gant piv eo bet lakaet an traoù-se en e di? " Evit an abad Lebreton, e seblant bezañ sklaeroc'h an traoù siwazh. Penaos e c'hall unan hag eñ, beleg, hag harzet ur wech endev, mirout en e di n'ouzon pet metrad a vechenn...?"

( 25 a viz here 1975)

Yann-Ber P. a skriv ivez, war an tomm : "N'eo ket cheñchet doareoù archerien Bro-C'hall e-keñver ar Vrezhoned. War-dro kant broadelour o deus bet afer ouzh an archerien, disadorn ha disul

diwezhañ. Daou ha daou int deuet e pep ti, evit furchal, sevel ar familh a-bezh eus o gwele, da 6 eur vintin. "Opération anti-FLB" eo bet anvet ganto ha gant ar c'helaouennoù. "Opération anti-culture bretonne" eo kentoc'h. Ur bern tud anavezet o deus bet evelse afer outo. Da gentañ re AR VRO BAGAN : Kristina hag Herri. Yann ar Gall eus Keralored (Gwiseni), en deus kontet deomp pep tra, disul diwezhañ. Bez e oa un abadenn dañs round e Keralored met evit Kristina, ne oa netra ebet. E Brest edo d'ar poent-se, dastumet gant daou archer dilifre. Me lavar dit n'oa ket kalz a joa da zañsal disul, pa oa gouezet edo Kristina hag Herri en toull koulz lavaret. Deuet e oa un den eus Sant-Nazer da filmañ an dañserien. Setu m'eo bet korollet memestra, kuitez da ziskouez pep tra da dud Gwiseni. Setu neuze da 6 eur vintin, d'ar sadorn, antronoz, ur pezh trouz e porzh Keralored. Ha Yann Ar Gall o vont d'ar prenest : "Police Judiciaire" ! Goulennet e pelec'h edo Kristina. Ha Yann ganto da di Kristina. Graet dezhi sevel ha furch e pep lec'h e-pad seizh eur. Pep kelaouenn, pep paperenn, kontoù WANIG HA WENIG, lizhiri Kristina... pep tra zo bet sellet outañ. En armell-yen... ouzh ar silzig... da welout hag-eñ ne oa ket ur silzig-bombezennoù !!! N'he deus ket gallet Kristina mont d'ar skol disadorn. He breur-kaer zo chomet ganti betek maz eo bet rediet da vont gant an daou archer. da 1 eur goude lein !

Setu penaos emañ kont bremañ gant ar re ne soñjont ket evel Ponia hag e glikenn. Eveljust n'eo bet tamallet dezhi netra. Setu perak lavaran eo un dra a ratoz-kaer ha n'en deus netra da welet gant an FLB ; klask a reont avat dismantriñ an Emsav sevenadurel. Tro Herri bremañ. N'em eus ket

gouezet kement war e gont. Met feuket on muioc'h c'hoazh, rak evel ma tivinez, n'eo ket Herri a zo bet klasket afer outañ, met Rener an Oaled. Daou vloaz a-raok e vije bet me ha daou vloaz kent e vije bet Renan Gwennog... An dra-se zo evit tagañ an Oaled ha netra ken. Da 6 eur vintin int en em gavet ivez en e di. Savet an holl bugale hag all, furchet e gambr. N'edo ket er gêr, me gav din. N'em eus ket klevet hirroc'h. C'hwec'h eus an Oaled a oa en taol". Lizher eus ar 25. 10. 75

Meurzh 18 du 1975 - Ar bloaz-mañ, eo kouezhet gouel an Anaon da sul. Den ebet n'eo diredet d'ar greizenn, den ebet eus ar gennvaoù o kemerout perzh en Oferenn. Pep unan zo chomet e bered e rannad.

Tri dervezh a ouestlont c'hoazh d'ar re varv ha d'an deiz diwezhañ, e pignont eus an iliz d'ar vered gant ar c'hurunennoù. Met ivez gant boued hag evajoù. Diouzh an noz, dirak ti an hini tremenet, e vez korollet gant skoazell un troer-pladennoù. Tri loaz d'an nebeutañ e touger kañv. Pezh a zo un tamm mat a frejoù, rak ar c'hiz a zo reiñ da zebriñ ha da evañ d'ar re o zeu da "zerc'h-el kompagnunezh". Gregorio, an intañv yaouank, en deus lavaret din bezañ dispignet 300 lur, ar bloaz-mañ ; pezh a ra 60 dervezh labour bennak. D'an ampoent, e c'houniz un dervezhour war ar maez war-dro 3 lur bemdeiz, kontet dezhañ 2 lur tri bred an deiz. Lavaret am boa d'an derc'hent e vefe mat dilezel ar c'hiz, dreist-holl da evañ er vered. Den n'en deus graet van.

Yaou 20 du 1975 - Lorc'h zo ennon gant ar guchennad plant tomatez, a sav evel ur c'hoad ouzh talbenn ar presbital. Ha staget on da gutuilh ; ur

vi fritet gant un dornad anezho n'eo ket divalo tamm ebet. Ha setu lonket va c'hoan... Ur paotrig a sko ouzh va dor.

- Padre, ro din semoul...
- Petra c'hoarvez en da di ?
- N'eus mui gweneg ebet. Va mamm a ro boued d'an dud, da sul hepken. Ar park zo pell ha n'eo ket bras...
- Petra zebrez neuze ?
- Kafe nemetken.

Meurzh 25 du 1975 - O tont eus Alsmagn, emañ o paouez klevout : "Kavet e vez mat ar gwir d'en emnerezh evit ar boblad-se ha ne vez ket kavet mat evit ar Vrezhoned."

- Kristina a skriv : " ...an archerien zo o lakaat reuz e pep lec'h e Breizh. Emaint o furchal tiez ar Vretoned, an dra-se abaoe teir sizhun, ur miz dija ha kenderc'hel a reont atav. Ouzhpenn kant ti hag ugent zo bet furchet dija ganto. Ilizoù ivez. E-touez an tiez, va hini hag hini Herri... Goude 'vez kaset an dud da Roazhon. Tud 'zo 'vez lezet goude ar furchadennoù. Me 'lar deoc'h, n'eo ket gwall blijus bezañ dihonet evel-se abred diouzh ar mintin ha bezañ dalc'het ganto e-pad daou zevezh a-bezh. Tud zo zo chomet c'hwec'h devezh ha trizek zo bet kaset da Bariz. Nav diouto zo chomet, en o zouez Yeun Gourvez.

Kemeret a reont n'eus forzh petra en tiez, lizhiri hag all. Un nebeut sizhunvezhioù, a-raok, en doa roet din Yann-Ber ho kontoù W. ha W. Mat, ar follennoù-se zo aet ganto. D'am soñj eo peogwir eo oa anvioù warno. Ar fichennaoueg zo bet furchet evel just. Dre chañs, n'eo ket aet ganto. Met ar pezh a zedenne anezho eo an anvioù hag an darempredoù etre

an dud. Roet o deus e-giz-seda abeg e oant o klask tud eus ar F.L.B. met n'eo nemet un digarez. N' eus forzh piv a vez paket, harzet e-pad an noz. Leun eo an hentoù a archerion, o spontañ an dud e-kreiz an noz.

Kuzulioù-skoazell a-enep d'ar gwaskerezh a vez savet e pep lec'h e Breizh. Hini Brest a zo an hini buhezekañ, d'hor soñj. Marteze peogwir eo e Brest eo ez eus bet ar muiañ a reuz. Ur vodadeg a zo bet er C'hastell-Nevez d'an 11. Forzhig a dud ez eus bet, met siwazh, n'emañ ket toud an dud o fiñval. Kalz anezho, memestra, a oa drouklaouen goude an taol-se. Ur vodadeg all a vo e Pondivi, d'ar 26 evit Breizh a-bezh ?

Dres ar sizhun goude ma oa kroget ar reuz e oa ivez bodadeg Wengamp. Sañset, a-hervez, ne vefe nemet un devezh stourm evit ar sevenadur met gant ar pezh a oa c'hoarvezet ne oa ket posupl komz eus ar sevenadur hep ar peurrest, rak kalz a dud oc'h ober war-dro ar sevenadur a oa bet harzet. Hag ouzhpenn e oa aze tri-mil a dud, pe dost, ar pezh na oa ket fall. D'am soñj, pennoù bras ar Stad C'hall a zo kroget aon enno hag emaint d'o zro o klask spontañ an dud. Rak gwelout a reont mat emañ ar minorelezhioù oc'h en em sevel. Emañ ar Stad o vont war hent ar faskouriezh. Pa vezer goulennat aet evel-se en em santer evel e-pad ar brezel, o deus lavaret tud zo. Ha d'am soñj eo gwir, daoust ma n' em eus ket anavezet an amzer-se. Eveljust ne c'heller ket lavarout omp bet gloazet gant bazhadoù ; n'eus ket bet skoet warnomp met n'eo ket bet gwelloc'h evit ar spered. Dreist-holl evit ar re a zo bet dezouget da Bariz.

Tu a vefe c'hoazh da gomz diwar-benn ar gudenn-se, kement a c'hellfen lavarout ! Ar pezh a chom d'ober a zo dieubifñ ar re a zo c'hoazh en toull.  
(Lizher eus an 12 du 1975)

Gwener 28 du 1975

Hanter-kant vloaz am eus. Ma ! E-pad ugent vloaz vuhez em eus gwelet prenañ 'petrol' ('tireoul') evit lakaat el lampoù taol hag el leternioù kraou. 'Kerozene' eo e anv amañ. Ha gant 'kerozene' ed a en-dro va zommerez. Hag e lavar din hiziv ar genwerzhourion n'eus mui a direoul er gêriadennig. Neuze e krog un tamm aon ennoc'h. Gant petra 'ta ec'h aozin va zamm boued ? Penaos mont da glask keuneud ? Pelec'h ober tan ? Dre chañs e kavan tri litrad e ti Tomaz Wanka.

Sul 30 du 1975, Azvent 1975

Prezegomp ur wech c'hoazh an distro ouzh Doue, ar c'hemm kalon. Penaos bezañ kristen hep bezañ ur selaouer : selaou Komz Doue ; hep bezañ ur c'hreder : krediñ diwar selaou ; hep bezañ ur c'hemmer : kemmañ ar galon diwar grediñ.

Emaomp e 1810, d'ar 15 ha 16 a viz gwen-golo e Mec'hiko. O ferson en o fenn, annezerion Dolores en em sav a-enep da Spagn. Paz eas er-maez eus e di edo kabiten dragoned ar rouanez en tu dehoù dezhañ. Rak eñ eo a vroudas d'ar stourm evit an dieubidigezh an tolpadoù amerindian kentañ. D'an Indianed-se e teske kalvezelezhioù nevez ar bed hag e spagnoleg e troe oberoù Racine ha Molière.

D'an 29 a viz gouere 1811 e kouezhas ar beleg-se dindan boledoù ar roueelourion. Mont a reas Hidalgo d'ar marv en ur lenn seder ha goustad en e vreviel ar salm 'Miserere'.

"D'an deiz m'eo bet kanet evit ar wech kentañ e Lima kan broadel Perou e ketchouaeg 'el arzobispo Vicario General Castrense del Perú, General de Brigada, Alcides Mendoza' a lido un oferenn hag a raio ur brezegenn e ketchouaeg."

Goude Sened-Meur Vatikan II e weler c'hoazh eskibion 'Jeneraled Vrigadenn', arc'heskibion evit piv ? Ar parrezioù n'int ket graet evit ar chas. Aes eo d'ar soudarded ha d'o ofiserion mont da lidañ an Eukaristia en iliz an tostañ, a-gevret gant ar gumuniezh an nesañ ha n'eo ket amzer a ra diouer dezho.

Lun lañ kerdu 1975

Ar c'hiz eo amañ stardañ ar c'hof gant gourizoù ler ledan meurbet, kinklet ar boukl anezho gant un arouez pompadus, aes mat da welout. N'ouzon ket a belec'h e teuont ; war a seblant koulskoude ne vefent ket hep bezañ awenet gant ideologiezhoù. Penn ar "Che", an erer impalaerel hag, an deiz all, war gouriz ur skolaer yaouank, ar groaz kamm, ar svastika, arouez an Nazied... Sed aze arouezioù prometeek war gofoù al Latin-amerikaned ! Daoust hag int-i ivez a fellfe dezho arnodiañ seurt euzhviloù evit tizhout an dieubidigezh ? Ac'hanta, evelato, ne fell ket din stlepel en hevelep ifern Guevarra hag Hitler.

Meurzh 2 kerdu 1975

Kenderc'hel a ra an Aotroù Doue da gomz. Gwelloc'h e vefe lavarout ne ehan ket a lakaat e viz war gomzoù distaget gantañ ha miret el Levr. Ha setu perak e c'houlenner diganimp bezañ war evezh ouzh 'arouezioù an amzerioù'. Bezañ barrek da lenn en darvoudoù. Perak 'ta, an deiz a hiziv, ez eus kement a dud o poaniañ da sevel "Europa ar c'henelioù" ? Daoust ha ne vefe ket ur sin ? Skrivet eo e "Levr Merzherion Israel" : "Antioc'hos a lakaas embann dre e rouantelezh a-bezh ur c'hemennadur : holl bobloù e impalaeriezh a zlee dilezel o gizioù o unan evit ober ur boblad hepken..." (I. Mac'h. 1/41)

Yaou 4 kerdu 1975


"E gwirionez, douar ar bobl gorsikat eo Korsika..." (14-31 Eost 1975) "Kent bezañ un departamant gall ez eo Korsika, e spered an dud, Korsika. Hervez an istor ez eo bet Korsika ivez. E-giz-se eo hiziv : ne c'hall ket bezañ disheñvel warc'hoazh..." (29 eost 1975). Piv a skriv kement-se ? Un eskob, hini Ajaccio, Yann Charlez Thomas. Evidomp, Brezhoned, n'eo ket c'hoazh sonet an eur-se. Eur un eskob hag a grogfe da zistagañ lavar-enoù seurt se hag a lakafe Breizh e-lec'h Korsika. Siwazh, dav eo daleañ rak ne c'hellfe ket un eskob, er mare-mañ, diskleriañ : "N'eus ket ur Brezhon, n'eus ket unan hag a asantfe da gement-se..." Div wech gall eo e fell dezho bezañ, ma n'eo ket teir gwech mar gallfent. Pegen diwarlerc'hiet eo va bro, pell-pell war-lerc'h Euskadi, Katalounia, Korsika, Papouazia h.a. Molutez zoken, ha n'ouzer peseurt enezenn e kement korn a zo eus ar bed. Ur vezh ruz !

31 kerdu 1975

Nedeleg... Treutik ar gouel dre amañ. Bremañ koulskoude e vez prenet ur c'hoariell mezell ('plastik') bennal d'ar vugale. Ur c'hev-rin eo n'o defe ket gallet misionerion an Andoù reiñ lufr da zarvoudoù meur ar Feiz Kristen : Nedeleg, Pask, Pantekost. Ledan e vez lidet ar Sizhun Santel, betek Gwener ar Groaz, moarvat. Meurlarjez nemetken a laka an Amerindianed d'en em zifretañ.

DIBENN DEIZLEVR 1974-1975  
=====

DIELL e yezh kechwaek, tennet eus ul levr  
kelenn kristen



*José, wawata-mamantawa Egipto llaqtaman  
pusarqa.*

— 48 —

*Josef, gant ar bugel, e vann, da Egipt bro  
a ya*

5. Yupachikunankupaq, warmin Mariapiwan; payqa wiksayoqñ karqa.
6. Jinaptinmi, chaypi kachkaptinku, chayamurqa, wachakuna punchawkuna.
7. Jinaptinmi, piwi qari wawanta wachakurqa, jinaspa, pañalwa maytuykuspa, uywakunapa samanan wasipi siriykachirqa, paykunapap, samakuna wasipi, mana campo kasqan-rayku”.

EVANGELIO: San Lucaspa, 2: 8-20.

***Angelkuna runakunapas yupaychanku Qespichiq Jesusta Belen Portal Machaypi.***

8. “Chay urqokunapi karqaku michiqkuna, tutantin uywanku qawaspanku.
9. Jinaptinmi, Taytachapa Angelnin, rikurirqa paykunaman. J. naqpacha kanchayninwantaq maytuykurqa, jinaspa jatunllataf mancharikurqaku.
10. Chaymi angel nirqa: “ama manchakuychischu: yachaychi jatun kusikuytan willaykichis runakunapaq.
11. Davidpa llaqtampim, juk qespichiq Cristo Jesús, qankunapa paqarimun (nacemun).
12. Kay willakuyki kanqa reqsinaykichispaq: tarinkichismi llull wawachata, pañalkunawan maytusqata, qaqachiri jatuspi sirisqata.
13. Jinaptinmi, qonqayllamanta, angelwan jukllakurqa, achkall ña janaqpachapi serafinkuna, Diosta takistin:
14. “Gloria kachun Diosman Janaqpachakunapi, kay pachapipa juwka kausay kachun, Diospa kuyasqan runakunapaq”.
15. Jinaptinmi, paykunamanta angelkuna Janaqpachaman ripu tinku, michiqkuna paykunapura rimanakurqaku: “Jaku, risunch Belenman, jinaspa qawamusun taytanchispa willawasqanchista”.
16. Raskilla rispanku, tarirurqaku Mariata, Joseitawan, llull wawachatataq, uywapa qaqachiri jatuspi sirisqata.
17. Qawaykuspankutaq, willakurqaku kay wawachamanta, paykun naman willasqa kasqanta.
18. Jinaptinmi llapa uyariqkuna, utispa qepakurqaku, michiqkuna na willakuptinku.
19. Mariataqmi, tukuy kaykunata waqaycharqa, sonqon ukupi yaymanastin.
20. Michiqkunataqmi kutipurqaku, Diosta yupaychastin, takistin pas, tukuy rikusqankumanta uyarisqankumantapas”.



